


ПОМΕΠΟΕ

ΟΕ



© PERON

skrid J. RIOU skoudemou P. PERON

**Nomenoe**

**==== oe!**

Moulet ez eus bet eus al levr-mañ,  
da veza lakaet er c'hemwerz :

15 skouerenn war baper "Holland"  
niverennet eus 1 da 15.

50 skouerenn war "pur Ill Lafuma"  
niverennet eus 16 da 65.

250 skouerenn war "Allax-Navarre"  
niverennet eus 66 da 315.

Moulet ez eus bet ouspenn :

7 skouerenn war "Holland"  
niverennet eus A da G.

20 skouerenn war "Allax-Navarre"  
hep niveradur,  
ha n'int ket da veza gwerzet.

Skouerenn niv. 265



# Nomenoe oe!

Pez-c'hoari e nao arvest  
gant

J. RIOU

Skeudennou  
gant

P. PÉRON

SKRID HA SKEUDENN

BREST - 1941

*Pep gwir miret striz, e  
pep bro, evit an troidige-  
zou pe an aozadurioù  
evit ar c'hoariva hag ar  
flävskeudennerez, gant an  
Itron J. Riou.*

## *Eur ger diwar-benn “ Nomenoe - oe ! ”*

Echu eo bet “ Nomenoe-oe ! ” gant Jakez RIOU, e Douarnenez, d'an 20 gouere 1935. Er bloavez-se lvez, e oa bet treset e skeudennou evit al levr gant an arzour brestat, P. PERON.

Aet e vo bet eta pemp bloaz hanter e-biou etre ganedigez an oberenn hag ar mouladur anezl. Skollhet eo bet, heñvel, e-doug an hevelep maread, eur bern dournskridou all hag a oa da veza embannet dindan arouez “ Skrid ha Skeudenn ”. Rak n'eo bet ar pemp bloaz hanter-se na goullto na disourl evldomp.

Jakez RIOU a zo aet da anaon ar 14 a genver 1937, hag e genelled o-unan a zo bet dalc'het da vont war-raok gant meur a zarvoud.

Hizio, avat, e c'hellomp kinnig d'hor c'henvroiz: “ Nomenoe-oe ! ” unan eus an oberou chomet diembann war-lerc'h ar skrivagner.

Ar mouladur a vo kavet amañ da heul a zo bet adskrivet diwar e zournskrid, en eur vont ar reisa ma c'helled a-dreuz an notennouigoù hag ar c'hemmadennou sirewet penn-da-benn an obereann. Figus meurbet e oa Jakez RIOU war e labour brezonek, ha skrivet-diskrivet e veze gantañ, ken n'en kave klok evit an embann.

N'eo ket d'imp da veull ar seurt pezh-c'hoaril sabataus. Na d'hen difenn. Marteze, koutskoude, e vo kavet da abeg! eun distera gant hini pe hini e fentigellou llibr-a-deod, — lod a lavaro : dizoujañs — kouerien drant ar c'hoaril-se. Jakez RIOU a oa yac'h e c'hoaril : doun, avat, e spered. Goude c'hoaril, d'e heul, a galon vat, pe... c'hoaril glas, al lenner a vo dao d'ezañ klask pe vennad a oa kuzet dindan ar larserez reut. Hag e luro meur a wirionez dirak e zaoulagad, houmañ da skouer : gwelet lall eo neb a glask kemma tra-pe-dra e boazlou an dud. Petra eo goullt emgann Balton, an emgann a roas he frankiz da Vreiz, e-pad mli bloaz, e kenver koll loar ar miz ?



A drugarez-Doue, e vo kavet bepred da embann talvoudegez ar Stourmer, eun Tad Konvolon, eur Breur Gwennoll, eur Foeter-Hent... ha da vont d'e heul meur a Izidor, ha meur a « lakepod » all.

N'eo kemmet netra. Pez a c'hoarvezas, m'oarvat, 1.100 bloaz'zo, a c'hoarvez hizio. N'anavezet ket talvoudegez gounidou kadourien ar brezoneg.

Hogen, eur wech ouspenn, an Tadou Konvolon, uhel-speredet, ar vreudeur Gwennoll, chomet bugale eun tammig, nemet leun a youl-val, ar Foeterien-Hent, da lavarout eo neb n'eo ket stag e ene ouz an danvez, eman ar wirionez ganto.

Kemper, 20 genver 1941.

Youenn DREZEN.

## Eur gontadenn e doare kentskrid

*Izidor, daoust ma oa aet diwezat d'e wele, en ostaleri an Trilonk, ne deue ket ar c'houssked d'ezañ. Ne ehane ket trei ha distrei ha chench penn d'ar c'holc'hed gant e dreid. E vreur yaouank, gourvezet en e gichen, a glemmuske :*

*— N'eo ket unan evit repozi. Petra ' c'hoarvez henoz ganit o krapat ha diskrapat ? Ehana a ri pelloc'h dispac'ha ha termi ?*

*— Dalc'h ganit gwele, golc'hed, penn-wele hag all, a respontas Izidor.*

*Hag heñ e-maez.*

*— Da belec'h emañ o vont ? a c'houlennas ar breur yaouank.*

*— D'al liorz, d'ober eur blegadenn, a lavaras Izidor.*

*Hag ar breur yaouank, boazet ouz imor fall ar breur bras, en em souchas dindan ar pell hag a chenchas tu evit ober eur c'houssk all.*

*Izidor a dostaas, diarc'hen, ouz an oaled; sellout a reas ouz ar siminal. En e zourn e luc'he eur gontell. Chom a reas difiñv eur pennadig, o selaou, rak kredet en doa d'ezañ kevout eun trouz bennak en eur gwele. E vreurig an hini ' oa o huñvreal kreñv. An tad hag ar vamm hag ar vreudeur all, labezet o c'horf gant eun devez maradeg tenn, a oa kousket mat, hervez ar roc'hou a groze dre gwerzidou ar gwelsoù.*

*Izidor, evit gwir, en doa kavet an tu, an deiz-se, da chom hep mont da varat. Hogen, e dad ne oa ket bet gwall nec'het, rak Izidor a veze atao mastoc'het e labour, hag an doubennou boemmet gantañ, al lastez hag ar geot mellek a ziwane enno dizale, drusoc'h eget araoq. E dad a oa boazet da lavarout : « Al labour a zo eur stourmadeg pemdeziek war an douar. Hogen, en emgann-se, ni 'a dle en em labeza, en em laza evit lakaat an douar da veza frouezus. »*

*Izidor, avat, e-lec'h en em laza, ne rae nemet laza an douar.*

Izidor a sellas ouz al loar a skuilhe he sklerijenn dre ar prenes-trig; ar pellgent a oa tost. Digeri a reas an nor en eur deurel evez bras. Evelato, ar vudurenn a wigouras er garan, hag an tad, dre vored, a c'houlennas digant e wreg :

— Ne santit ket c'houez anduilh, e-barz an ti ?

— Eo, emezi, hag ouspenn, klebet em eus ar gazez c'hell o rizin-kat er porz.

D'ar mare-se eus an noz, kalz Bretoned, paotred yaouank start, ha bagol, hag ar peurvuia anezo hep kar na par, hep leve na danvez war an douar, a gerze eus pep korn eus ar vro da gavout Nomenoe, emzavet evit ar vro, hag ar stered o hente hag al loar-gann o para en vobl sklaer mezeven, a skuilhe, a-berz Doue, he sklerijenn war o hent.



## Roll ar c'hoarierien

Ar Foeter-hent

Gwennoll, manac'h yaouank

Konvoion, eskob ha maer kêr  
Redon

Nomenoe

Izidor

Lomig

Perig

Jobig

ha Bugale ar skol

An Archer Kenta

Mestr an Archerien, hag Ar-  
cherien all

Yann, gant e vuoc'h

Youenn, gant e ebeul

Fañch, gant e bemoc'h

Jakez, kiger

Job, ha Kourien all

Ar paour, gant e gi

Naig, gant he dañvad

Madalen, gant he viou

Maïvon, gant he fesked

Seza, gant hec'h amann

An Tabouliner, ar C'hloc'her,  
ar Gedour, ar C'halvez, an  
Ostizez

Ostiz an « Trilonk »

Soudarded

An Eostig, al Laouenan, ar  
Voualc'h, ar Rakerig, an  
diou Vran, ar Sparfell

An Touseg

An Awen

LEC'H — Redon, e Breiz

*Kenta Arvest*

*Manati Redon. Eur gambr vras. En daou du, gweleou, kousket enno bugaligou. Ar manac'h GWENNOLL a ya hag a zeu eus eur penn d'ar penn all, o prederia. Selaon a ra, e skouarn ouz eur prenestr, eur FOETER-HENT, o vale er-maez.*

#### AR FOETER-HENT

Al loar a zo kaer, an noz a zo skañv. An Aotrou Doue emañ e anal o tremen, henoz, war ar maeziou... Eur steredenn a zo kouezet eus an neñv, e tu ar reter... Eur steredenn a zo kouezet; eur roue a zo bet divarc'het. Va c'halon a zo diboaniet, rak Breiz a zo digabestret.

#### GWENNOLL

Breiz digabestret !... Nag a vrud e kêr Redon, bremaik, pa vo savet an heol. Nag a levenez pa zegouezo war ar blasenn, Nomenoe, ar marc'heg holl-c'halloudek, gant e varc'hegourien daer, sounn o fenn, feroni an emgann ha levenez an trec'h en o sellou talarek. Dont a raint da zaoulamm o mirc'hed kuladus, frankaet o fronellou, o moue en avel, tan en o daoulagad hag eonenn war o divesker, ruziet gant gwad an enebourien villiget. Gloar da Vreiz war an douar ha gloar da Zoue e-barz an Neñv evit ar blanedenn gaer a voe tonket d'imp ! (*Eur boutad avel a hej stalafiou ar prenestrou*). Ene ar roue Arzur o tremen, moarvat. Aotreet eo bet d'ezañ gant an Aotrou Doue da ziskenn e Breiz ha da gaout perz, en hon touez, en nevezenti vurzudus. O ! Nomenoe, enor ha meuleudi ha gloar d'eoc'h ha d'ho kadourien adalek an deiz a hizio betek an deiz meur ma vo gwelet eur groaz tan o skedi en neñv ha Mab Doue o tiskenn war eur goumoulenn da zont da gemenn d'ar gristenien e vo degouezet fin ar bed... Ouf ! n'eo ket fall. An Awen ha me, ni en em glev evel breur ha c'hoar. Savomp eta buan eur werz ma vo dibabet evit beza lennet war ar blasenn pa zegouezo Nomenoe gant e vrezelourien c'hlorius. Plijout a ray, me ' zo sur, d'hon tad santel Konwoion hag, er c'henstrivadeg, e teuio ar maout ganin.



(O prederia)

Ar c'hi a harz er c'hoad,  
A harz d'e vestr lazet;  
E vestr ' oa gall moarvat...

N'eo ket fall. (*Sellout a ra ouz ar vugaligou en o gwele*). Bugaligou kousket, bugaligou evurus !... Dec'h e oant Gallaoued, hizio int Bretoned !... Bugaligou evurus !... Pet eur eo gant al loar ?... (*Hanter zigeri a ra eur prenestr.*) Eun eur a zo c'hoaz araok poent an dihun. Ha strakal a rin va daouarn evit o dihun dioc'htu ? Pec'hed eo moarvat o lezel da gousket pelloc'h, rak n'ouzont ket c'hoaz an nevezenti veur. En o c'houk int sklaved, ha, pa zihunint, en em gavint tud dieub. Nann, n'int ket c'hoaz evurus, ar vugaligou gaez, p'eo gwir n'ouzont ket. O dihun a rin ? Nann; arabat, rak, pa soñjan mat, an den kousket a zo an den dieuba; e spered a nij, a wel traou kaer ha na lifer, nag hual, na kabestr ne vir outañ trouc'ha hent. Bugaligou evurus !... Ha mil bennoz d'eoc'h, Gwerc'hez ar Wir Zikour !... Kendalc'homp !...

Ar c'hi a harz er c'hoad...

N'eo ket fall.

EUR BUGEL

N'eo ket mat.

GWENNOLL, *souezet*

Hein ? N'eo ket mat ? Ha petra n'eo ket mat ?

AR BUGEL

Ar c'hi er c'hoad.

GWENNOLL

Eur paour kaezig o huñvreal... Bugale evurus !...


Ar c'hi a harz er c'hoad,  
A harz d'e vestr lazet...

EUR BUGEL ALL

Ne dalvez mann ebet.

GWENNOLL

Oc'ho ! 'M eus aon n'eo ket peurgousket an holl vugaligou... Pe marteze emaint gwasket gant gwall huñvreou ?... Pe marteze c'hoaz, glour Nomenoe a lugern e noz o c'houk ?



**An impalaer gall  
A zo...**

...Fall. EUN TREDE BUGEL  
GWENNOLL

Gwir eo; an impalaer gall, galloudek gwechall, a zo aet da fall. Ne dalvez mui netra ebet, hag ar vugaligou-se a gar kement o bro !... (*Kenderc'hel a ra*).

**Ar brini lor, ar brini du...**

A zo fall du. EUR PEVARE BUGEL  
GWENNOLL

Mil malloz ruz ! AR BUGEL

Turlututu ! GWENNOLL

An azen a reont ganin. Paour kaez Nomenoe !...

Oe-oe !... AN HOLL VUGALIGOU  
GWENNOLL

A ! bugale dianket, ker e kousto d'eoc'h. War-sav ! war-sav ! En em wiskit buan, paotred ! Buan ha buanoc'h ! D'an dour ! d'an dour ! Ha te, sevel a ri ? (*Gwinta a ra eur paotrig eus e wele*). Ha ma chom eur bikouzenn e korn da lagad hag eur gramenn adreñv da skouarn, ne zebri epad eur sizun nemet kreun ha bruzun.

AR BUGEL, *difoutre*  
Kreun ha bruzun eus ar meurz betek al lun.

Dal ! da lod ! (*Hag e ro d'ezañ eur flac'had ouz kostez e benn*).

Oe ! AR BUGEL  
GWENNOLL

Goap a rez ouzin c'hoaz ? (*Hag e ro d'ezañ eun taol troad en e benn adreñv*).

Oe !

AR BUGEL

Oe-oe !

AN HOLL VUGALIGOU

GWENNOLL

Mont a rin diot gant ar marmoused-mañ. Ahe ! kuit ac'han ! Buan d'an traoñ !

EUR BUGEL, *en dour*.

Kramenn a zo c'hoaz ouz va fas.

GWENNOLL

Ma ! diskenn gant kramenn hag all. Manous eur Breizad n'eo ket reketus da welout. Bretoned omp hizio.

AR VUGALIGOU, o tiskenn d'an daoulamm gant an diri.

Oe ! Oe !

GWENNOLL

Paour kaez Nomenoe !

(Lien.)



*Eil Arvest*



*Eur sal-studi. Gwennoll. Ar vugaligou.*

**GWENNOLL**

Lavaromp da genta eur bater hag eun ave evit renta gloar da Zoue ha kinnigomp d'ezañ meuleudi kalonek evit an enor bras en deus graet d'hor bro. Dre e volonteiz, Breiz a zo bet digabestret; Breiz a zo diberc'henn. N'hon eus mui war an douar nemet eur mestr : an Aotrou Doue hepken. Klevout a rit, bugaligou ?

**LOMIG**

Klevout a ran ha kompren ne ran ket.

**GWENNOLL**

Bugale dientent ! Breiz a zo digabestret, da lavarout eo bet trec'het armeou ar C'hallaoued gant soudarded Nomenoe, ha ne gomprenit ket ? Spontus eo kement-se.

**LOMIG**

Ha piou eo Nomenoe ?

**GWENNOLL**

Ha piou eo Nomenoe ? Setu eur goulenn difeson ! Aes eo gouzout, diot ac'hanout ha diot ac'hanoc'h. Nomenoe a zo eur Breizad taer. Ar chas ne dagont ket ar chas ha, pa vez drailh, e tegouez dalc'hmat etre Breizad ha Gall. Emgann a zo bet war gomepezenn Ballon ha Nomenoe, e penn ar Vretoned, a zo deût a-benn da danfoeltra ar C'hallaoued e rouantelez an Anaon.

**LOMIG**

A ! bremañ e komprenan. Bec'h a zo bet etre maout ar Go ha maout ar Gall; ha maout ar Gall en deus paket lamm.

GWENNOLL

Dres ! Boued pasket a zo flour da zibri. Nemet evit da lakaat a-benn eur wech all da zigeri frankoc'h da ziskouarn hir, te a lavaro hizio, epad ar bourmenadenn : me eo ar genaoueka hini a zo maget er skol. Ha taol evez gant aon e chomo prennet da c'henou, eur vunutenn.

LOMIG

Me a vez tizet dalc'hat, e lec'h ar re all.

PERIG, da LOMIG

Ha c'houi a vez atao o klemmuskat hag o c'hrignousat.

LOMIG

Grignous ? grignous ? Ha c'houi, daoust ha gouzout a rit piou eo an Nomenoe ?

PERIG

Ya, emichañs. Va breur bras Izidor a zo aet gantañ da vrezel-lekaat.

LOMIG

O ! neuze eo Nomenoe eun den a netra.

PERIG

Abalamour n'emañ ket ho preur o c'hoari gantañ.

LOMIG

Fougaser ac'hanoc'h ! A-boan ma anavezit zoken an « a » ouz an « o ». Arabat d'eoc'h kredi e tifaziin ho teveriou a-benn ar wech all.

PERIG

C'holada ! hag e kav d'eoc'h en em gavan nec'het evit se ?

GWENNOLL

Peoc'h a vo e penn traoñ d'ar c'hlas ?... Ha bremañ, selaouit ha klevit ouspenn. Hizio ne vo na kentel na dever...

HOLL

Bravo !

JOBIG

Perak ?

HOLL

Añ ! hennez a vez atao gant e beragou.

GWENNOLL

Peoc'h en traoñ pe me ho perago bremaik... Ne vo na kentel na dever en enor da Nomenoe...

DAOU PE DRI

Gloar da Nomenoe !

HOLL

Oe !

GWENNOLL

Ha peoc'h a vo pe ne vo ket ? An hini a vo re hir e deod e savo keuz d'ezañ dizale. Ne vo na kentel na dever hizio. Hogen, p'eo gwir, hervez gourc'hemennou Hor Mamm Santel an Iliz, e tle spered eur c'hristen beza atao war evez ha morse dizoursi, gant aon da veza touellet pa soñjo an nebeuta, c'houi a savo bremañ, pep hini ouz e du, hag hervez e awen, eur werz kaer meurbet en enor da Nomenoe. An hini vrava a vo dibabet gant hon tad Konwoion evit beza lennet war ar blasenn pa zegouezo e kêr ar vrezelourien veur. Ha stagit dioustu gant al labour.

LOMIG

E brezoneg pe e latin e vo savet ?

GWENNOLL

E brezoneg, evel just; e brezoneg, penn da benn. (*Outañ e-unan.*) Eürusamant va gwerz-me a vo an hini vrava (*Lenn a ra en eul levr koz en deus kavet e tiretenn e daol-skriba*).

An aour yeotenn a zo falc'het;

Brumenni raktal en deus graet.

Argad !

A ! ar varzed koz a ouie an doare. Marvet eo ar ouenn anezo, siouaz ! Nag eo kaer !... *An aour yeotenn a zo falc'het*... Falc'het gant falc'h an Ankou. (*Prederia a ra eur pennadig*). Emichañs ne

gounnaro ket ouzin nag ar barz nag an Awen ha ne gouezin ket er pec'hed marvel ?... Rak eur pec'hed bras eo al laeronsi... Kazi-sur zoken, ne gouezin e pec'hed ebet. Ar werz-mañ n'eo ket sinet; rak-se n'eus perc'henn ebet d'ez. Hag ouspenn n'emañ ket an ton war ar son; setu n'eo nemet labour divrazet. Me a lakaio an ton da zegouezout gant ar werz hag evelse, an hanter a vo d'ar barz koz hag an hanter all a vo d'in... Ar gwasas 'zo evelato, n'anavezan ket an ton gwirion...

LOMIG da BERIG

Ha gwir eo aet ho preur d'ar brezel gant an Nomenoe ?

PERIG

Pa lavaran d'eoc'h.

LOMIG

Ha c'houi a anavez an Nomenoe ?

PERIG

Evel va breur ha va zad.

LOMIG

Ha penaos eo an den ?

PERIG

Ha c'houi a zifazio va deveriou ?

LOMIG

E-giz araok.

PERIG

Nomenoe a zo eun den kaer, eun den bras; ne gousk na noz na deiz ha biskoaz ne vez skuiz; e vleo a zo melen, e gleze a zo anezañ bec'h eun den, e nerz a zo trec'h d'eur jao.

LOMIG

N'eo ket neuze eun den evel ar re all ?

PERIG

Nann, n'eo ket eun den evel ar re all.

LOMIG

E pelec'h hoc'h eus anavezet Nomenoe ?

PERIG

Morse n'em eus gwelet Nomenoe; hogen, gouzout a ran ez eo eun den kaer, eun den bras, eun den kreñv.

LOMIG

Gwir eo, panevet-se n'en dije ket gallet planta lamm d'ar Gall... Nemet dont a ra ganeoc'h ho kwerz diwar-benn Nomenoe ?

PERIG

Dont a ra evel e lost d'ar c'haz; ne vo ket savet, avat, diwar-benn Nomenoe.

LOMIG

Ha diwar-benn piou 'ta ?

PERIG

Diwar-benn an anduilh.

LOMIG

N'emaoc'h ket mat ?

PERIG

Eo ! Nomenoe en deus gounezet an emgann, ha, pa zegouezo e Redon, e vefe eürus o kavout dirazañ eur mell pladad friko, n'eo ket 'ta ? Ha ma vefe c'houez an anduilh mogedet er pladad friko, neuze en em gavfe Nomenoe eürus en e groc'hen.

LOMIG

Lakaat a rit an traou da zegouezout evel ma vefent c'hoarvezet... C'houi a oar rimal buan, ha me, war an ton ha war ar son, e choman atao boud.

PERIG

Neuze c'houi a zifazio d'in va deveriou epad eur sizun leun ?

LOMIG

Ober 'rin ma savit d'in eur werz heñvel ouz ho hini diwar-benn an anduilh. (PERIG a skrive hag a ginnig da LOMIG eur baperenn).

PERIG

Setu ar pennad kenta eus ar werz; bremaik, e savin ar pennad all : emañ daoulagad an targaz o para warnomp. (GWENNOLL o tont).

GWENNOLL

N'eo ket echu gant an daou-mañ c'hoaz konta gevier an eil d'egile ? (Outañ e-unan). An aour yeotenn a zo falc'het... Na pegen kaer !... Perak eta e klevan rebechou em c'houstiañs ? Pa n'oun ket evit kas da benn va C'hi er c'hoad... (Da BERIG) : Perak e chomez alvaonet o sellout ouz ar solier ? Ha da werz ? Savet eo ?

PERIG

Savet eo penn-da-benn.

GWENNOLL

Diskouez. (Lenn a ra kreñv).

Du-mañ, er siminal, e oa anduilhennou,  
Anduilhennou druz ha mokedet kaer;  
Du-mañ, er siminal, e oa anduilhennou...  
Siouaz d'imp ! en noz all, ez int aet gant al laer.

Du-mañ, er siminal, e oa seiz anduilhenn,  
Staget ouz ar c'hrog ha druz o lugerni...  
Du-mañ, er siminal, n'eus mui eun anduilhenn,  
Hag abaoe va zad ' zo klanv gant an avi.

Va zad ouz o gwelout ken kaer, a-istribilh,  
' Lavare 'n eur lipat dija e vuzellou :  
« Peur e vezint lakaet da graza war ar strilh,  
Ha peur e tiskennint betek va bouzellou ? »

Va zad a chom bremañ mudet gant ar glac'har,  
Ha ne gar mui tostaat ouz toull ar siminal.  
Gwasket eo e galon; en e geuz e lavar :  
« Me a garfe strilha an anduilhenn vras all. »

An eizvet anduilhenn eo va breur Izidor,  
P'eo gwir eo aet gantañ an anduilhennou all;  
Hennex ' zo eur c'hof bras hag eur galon digor,  
Eur genou kel ledan ha mantell ar siminal.

Izidor en deus rinset kement skalf oa er c'hrog,  
Hep lezel eun distera gant e dad hag e vamm,  
Ha goude ez eo kerzet, kent na ganas ar c'hog,  
War gein ar gazeg c'hell, dre an noz, d'an daoulamm.

D'ar brezel e kerzas da heul Nomenoe,  
En doa touet kas kuit roue ar C'hallaoued.  
— « Mistri Vreiz, emezañ, a vo me ha Doue,  
Hag ar Gall ' vo gwintet, pe amañ douaret. »

Bep mintin, en eur sevel, va zad a lavare,  
En eur lakaat e fri e toull ar siminal :  
— « Pa zegouezo en-dro soudard Nomenoe,  
E pako fest ar vaz ma ne gas ket ar Gall. »

Hogen, p'en doa gouezet e oamp trec'h e Balon,  
War an taol e teuas an dour 'n e zaoulagad.  
— « Izidor, emezañ, ' zo eun den a galon.  
Heñ eo va gwella mab, mab d'an eürusa tad. »

« Ha c'houi, Yannig ha Fanchig, it ho taou dre ar c'hèriou  
Ha zoken, ma vez ret, er parrezioù, tro dro,  
Da glask an hini gaera eus an anduilhennou  
Da frita da Izidor, pa zegouezo en-dro. »

N'eo ket re fall an holl, ha farsus eo eun tammig; hogen, ma talvez beza displeget, en noz, e korn an tan, en eur graza kistin darnet, re voutin ha re bobel eo evit beza displeget dirak Nomenoe; n'he deus ket dremm eur werz-lid. Kendalc'h evelato, paotrig, kendalc'h. Ma n'eo ket mat hep beza fall, e teuo marteze ar maout ganit, eur wech bennak, pa ne vi mui krennard. An taol-mañ, moarvat da labour n'en deus ket degaset d'it eur c'houezenn.

PERIG

O ! nann; gant va breur eo bet graet, ha neizeur eo bet degaset d'in en dro d'eul lur amann.

GWENNOLL

Da vreur a oar neuze rimal buan.

PERIG

Ar rimadellou a zeu d'ezañ evel c'hoant staotat d'ar c'hi.



GWENNOLL

Lez ar chas da redek ar c'had... Soñjal a raen : daoust m'eo divalo, re vrag eo c'hoaz evit beza ganet gant eur spered dientent evel da hini. (*Sellout a ra ouz LOMIG, deñt ar c'houked d'ezañ.*) Ha da werz, kousker lor ?

Echu eo.

LOMIG, o tivoredi

GWENNOLL

Savet da werz ha te o roc'hal? Neuze avat eo bet savet gant da ael gwardian? Diskouez, evelato, ma vo gwelet ha talvezout a ra. (*Kemer a ra ar baperenn.*) Feiz ! n'eo ket gwall hir : peder linenn. Dispar e tle beza. (*Lenn a ra.*)

Me a gar an anduilhenn,  
Hag he c'harin da viken;  
Ouz unan hepken e vouzin :  
Ouz ar mestr a ra skol d'in.

O ! Sapientia Domini ! n'emañ ket ar Furnez e korf ar bugel-mañ. Ha ya, paotrig, me eo an anduilhenn?... Me an... anduilhenn?... Me... me... an hini eo ? Mil malloz !... (*C'hoarzedeg er c'hlas.*) Keuz a savo d'it, paotrig...

LOMIG

N'eo ket me... n'eo ket me en deus savet anezi, rak n'ouzon ket rimal ha n'ouien ket petra ' oa warni.

PERIG, da LOMIG

Diwallit d'am diskuih...

GWENNOLL, da BERIG

Petra ' lazez ?

PERIG

Me ? Seurt ebet. (*C'hoarzedeg er c'hlas.*)

GWENNOLL

Boule' hurun ! ar peoc'h a vo pe ne vo ket ? (*Da LOMIG.*) Ha te, kae dioc'htu da benndaoulina e-kichen va bureo ha da ziouvrec'h



e kroaz. (LOMIG a sent. KONWOION a zeu er sal-studi. Kerkent, avat, ar vugale a zeu da veza sioul, evel kizier o logota).

KONWOION

Breur Gwennoll, klevet em eus trouz, amañ, bremaik.

GWENNOLL

O lenn e oan, va zad, ar gwerziou savet bremaik gant ar vugaligou, hervez ho kourc'hennou, ha pennadou a lakae anezo da c'hoarzin.

KONWOION

Ne oa ket dleet d'eoc'h o lenn kreñv, breur Gwennoll. Daoust ha talvezout a reont eun draig bennak ?

GWENNOLL

O ! mann ebet, va zad.

KONWOION

Soñjal a raen, avat, o dije lezet ar c'han hag an diskan gant laboused an Aotrou Doue.

GWENNOLL

Ha goude, e lennis an hini savet ganin, ha youc'het o deus, ken brao all o deus kavet anezi.

LOMIG

An anduilhenn !

KONWOION

Hag ar paotrig-mañ war e zaoulin hag e zivrec'h e kroaz ?

GWENNOLL

Lomig an hini a youc'he an herra.

LOMIG

O ! o !... n'eo ket gwir.

GWENNOLL, da LOMIG, goustad.

Emaout o klask hopal adarre. Prens da c'henou, amprevan !

KONWOION, da LOMIG

Kae da azeza ha chom reiz. (Da GWENNOLL). Arabat e oa, breur Gwennoll, lenn ho kwerz d'ar vugaligou... Dale'hit soñj eo dleet d'eoc'h, pa ne vefe evit an ano a zougit, beza atao fur ha direbech, e Sapientia Domini.

GWENNOLL

N'oa ket evit maga gloar, nemet evit deski d'ezo penaos sevel gwerziou evit meuli an Aotrou Doue hag ar vro.

KONWOION


Diskouezit d'in ho labour. (Lenn a ra).

An aour yeotenn a zo fale'het,  
Brumenni raktal en deus graet.  
Argad !


Kaer eo moarvat... C'houi a lavaro, breur Gwennoll, eur bater hag eun ave, gant aon da goueza e pec'hed an ourgouilh. (GWENNOLL a vousc'hoarz, eürus.)

GWENNOLL

Hag eun ton brao am eus lakaet war an diskan. (Mouskana a ra eun ton iskis : « La Marseillaise ».



An aour yeo, tenn a zo fale'het, Bru-men-ni rak-tal




en deus graet. Ar. gad ?

(Er-maez, eur foeter-hent a gan ivez a-bouez penn).

*Andante*



An aour yeo. tenn a zo falc'het, Bru.



men. ni rak.tal en deus graet. Ar. gad !'

(GWENNOLL, chomet berr, a vousec'hoarz glas. KONWOION a sell outañ, eur pennadig hir a-walc'h).

#### KONWOION

Breur Gwennoll, n'eo ket gwenn holl ho koustiañs. C'houi a lavaro eur bater hag eun ave evit ho pinienn...

(Lien.)



## Trede Arvest

*Leur-gêr Redon gant ostaleriou tro-dro.  
Paotred o sanko peulioù en douar. Tud  
o tont d'ar foar gant marc'hadourez ha  
loened. Eun archer.*

AN ARCHER

Maouez, maouez, da belec'h emaoe'h o vont gant ho tañvad ?

NAIG

Da belec'h, den mat ? D'ar foar, evel just.

AN ARCHER

Ne vo ket foar hizio.

NAIG

Eo, foar an deñved a vo.

AN ARCHER

Siouaz d'eoc'h ! ne vo ket foar hizio.

NAIG

Biskoaz kement all ! Hag a nevez neuze e kêr ?

*(YANN o tont dre an tu all gant e vuoc'h. AN ARCHER a tra tro.  
EUR PAOUR, en eur c'harr bihan, staget outañ eur c'hi.)*

AR PAOUR

Truez ouz eur paour kaez den mac'hagnet ha dall,  
Ha Doue ho pennigo er bed all !

NAIG, d'ar PAOUR

Dal ! gwenneg ar chañs, evit ma vo foar an deñved.



AR PAOUR

Doue ho paeo, itron vat,  
Ha chañs d'eoc'h da werza ker ho tañvad.

AN ARCHER, *da* YANN

Da belec'h emaoe'h o vont gant ho puoc'h ?

YANN

D'ar foar.

AN ARCHER

N'eus ket foar hizio.

YANN

Foar ' vo sur, p'emañ an deiz.

NAIG

P'emañ an deiz.

AN ARCHER, *taer*

Ne vo ket foar hizio.

YANN

Ha c'houi a lavar traoù 'val. N'eo ket al loened a vanko bremaik war ar blasenn.

AN ARCHER, *taeroc'h*

Na saout, na deñved, na tra. Ne vo ket foar hizio. (*Kouerien o tont dre en tu all gant loened pennasket. AN ARCHER a red daveto.*)

AR PAOUR

Truez, va breudeur gristen  
Ha roit d'ar paour an aluzen.

YANN, *d'ar gouerien*

Oc'ho ! degouezet oc'h ivez ?

YOUEN, *gant e ebeul*

Degouezet omp. Pe briz ez a al loened ?

AN ARCHER

Na priz na loened : ne vo ket foar.

YOUEN, *o c'hoarzin*

Hizio emañ foar ar c'hezeg hag araok eun eur amañ e vo keze-kenned ha mirc'hed kalloc'h, e-leiz, war ar blasenn.

AN ARCHER

Dont a raint marteze; gwerzet, avat, ne vint ket. Rak ne vo foar ebet.

YOUEN

Pe vo foar, pe ne vo ket, me n'oun ket chalet : en eur zont e kër em eus gwerzet va ebeul da Jakez ar c'higer.

NAIG

Gwerzet ha paeet ?

YOUEN

Paeet e vo mar n'eo ket c'hoaz. Gwelit : touzet eo ar vlevenn, e kroaz, war dailher al loen; a-benn eur vunutenn amañ, e touchin va gwenneien.

NAIG, *goapaus*

Pe Youen pe Jakez an hini a vo tizet ? Setu aze eun divinatenn.

AN ARCHER, *herr*

Pa lavaran d'eoc'h ne vo ket foar. Na kezeg, na tra.

YOUEN

Ha perak 'ta ?

(*Kouerien en tu all.*)

YANN, *d'ar paour*

Dal ! gwenneg ar chañs evit ma vo foar ar saout.

AR PAOUR

Doue ho paeo, va den mat, evit hoc'h aluzen,  
Hag a rabato d'eoc'h eur pennad pinienn.

(*Eur goueriadez gant eur banerad viou.*)

MADALEN

Ouf ! na pegen tomm eo d'in.

AN ARCHER  
Ha c'houi, maouez ?

MADALEN  
Eun diner ar vi.

AN ARCHER  
Na diner, na vi. Ne vo ket marc'had.

MADALEN  
Marc'had ' vez atao da zeiz ar foar.

AN ARCHER  
Ne vo ket foar hizio. Mont a rin diot o hopal an hevelep tra.

MADALEN  
Chesus va Doue ! Ne vo ket foar ? Koulskoude...  
(*Sellout a ra ouz an niver bras a dud deñt d'ar foar.*)

AN ARCHER  
It en-dro gant ho viou.

MADALEN, *o sec'hi an dour-c'houez ouz he zal*  
Setu 'ta !

AN ARCHER  
Ya, tomm eo.

MADALEN  
Tomm an amzer ha pounner va fanerad. Viou nao yar o tozvi  
bemdez epad eiz deiz. (AN ARCHER a dro kein. YOUEN a ro gwenne  
ar chañs d'ar PAOUR.) D'ar gêr ez in, pa vo goullo va faner.

AR PAOUR  
Truez, va breudeur gristen,  
Ouz eur paour kaez den  
Ne welo biken  
Eur berad sklerijenn.

(*An holl a ro d'ezañ gwenne ar chañs.*)  
Bennoz Doue d'eoc'h holl.  
N'ho po na keuz na koll.

NAIG  
Dal ! eur gwenne c'hoaz evit ma vo dreist-holl foar an deñved.

AR PAOUR  
Doue ho paeo. En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.  
(*Lavarout a ra eur bedenn.*)

NAIG  
Foar ' vo !

HOLL  
Foar ' vo !

MADALEN  
Ha marc'had !

HOLL  
Ha marc'had !

FANCH *o tont gant e bemoc'h*  
N'eo ket digor c'hoaz ar foar ?

AN ARCHER  
Da belec'h emaeoc'h o vont c'houi ho taou ?

FANCH  
Va femoc'h ha me, ni ' zo deñt d'ar foar.  
(*E-leiz a dud.*)

AN ARCHER, *kollet gantañ e benn*  
Ha c'houi ? ha te ? ha c'houi ? ha te ? ha te ?...

HOLL, *taer*  
D'ar foar !

AN ARCHER  
Pa ne vo ket...

MADALEN  
Ne vo ket foar ? Ne vo ket foar ! Setu aze eur ganaouenn !

HOLL  
Setu aze eur ganaouenn !

Perak ne vo ket ?  
 MADALEN  
 -Ha perak ne vo ket ?  
 HOLL  
 Abalamour... Selaouit...  
 AN ARCHER  
 Madalen  
 Hennez a zo mezo pe diskiant.  
 MADALEN  
 O ! o ! hoc'h ano ? maouez.  
 AN ARCHER  
 Ne vo ket foar ?  
 HOLL  
 Nann ! nann ! nann ! nann ! (Da vadaLEN) Hoc'h ano, maouez.  
 AN ARCHER  
 Madalen  
 Da sutal !  
 MADALEN  
 O ! o ! o !  
 AN ARCHER  
 A ! a ! a !  
 HOLL  
 Amañ ! amañ ! Sikour d'in (Archerien o tont, peb a skourjez ganto.)  
 AN ARCHER  
 Mestr an Archerien  
 Petra' c'hoarvez ?  
 AN ARCHER  
 Darbet eo bet d'in...  
 HOLL, ha droug en dud  
 Foar ' vo !

Mestr an Archerien  
 Ne vo ket !  
 AN ARCHER KENTA, laouen  
 A ! a ! a !  
 HOLL  
 Ha perak ne vo ket ?  
 Mestr an Archerien  
 Dre urz an Aotrou Eskob ha Maer, hon Tad Santel Konwoion.  
 (An archerien a denn tennou gant o skourjez. Eun tabouliner a zegouez war al leur en eur skei war groc'hen e daboutin. Tenna a ra goude eur skritell diouz e sac'h.)  
 MAIVON, gant he fesked  
 Brilli, brilli... brilli fresk... Eun diner ar vrellenn; eun hanter hini eun dousen pennou sardin.  
 AN ARCHER  
 Ho kenou gant ho prilli !  
 MAIVON  
 Brilli a zo em paner hag eun archer brell a zo dirazoun. (AN ARCHER a chom berr gant e respont) Sur oc'h chomet diskabell dindan an heol bero.  
 SEZA, gant he amann  
 Mall ' oa ganin beza erru; aet oan skuiz-maro o tougen va fanerad amann. Aet eo va c'horf da zour ha va amann da flibous. (Teurel a ra he faner war al leur.) Amann melen, amann druz, amann mat, amann marc'had mat.  
 AN TABOULINER, goapaer  
 Gwell a ze mar deo marc'had mat; disteroe'h ' vo ar c'holl. Drebet e vo sur; prenet, ne lavaran ket.

AN ARCHER

Setu degouezet mat: amann melen da frita brilli fresk...

SEZA

Ne gomprenan seurt e parabolennou ar re-mañ.



AN TABOULINER

Selaouit hag e klevot. (Lenn a ra.) A-berz an Aotrou Konwoion, eskob ha maer, ne vo hizio na foar na marc'had : na foar ar c'hezeg, na foar ar moc'h, na foar ar saout... na marc'had yer, na marc'had viou...

MADALEN

Brao emañ ganti !-

MESTR AN ARCHERIEN

Peoc'h ! (Strakal a ra e skourjez.)

AN TABOULINER

... na marc'had viou, na marc'had amann, na marc'had pesked...  
(Klask a ra eur skritell all en e sac'h.)

YANN

Ma n'eo ket evit staga ar c'hezeg hag ar saout, evit petra neuze emañ hennez o sanko peulioù en douar ?

AR C'HALVEZ

Eur volz-enor emañ o sevel.

YANN

Eur volz-enor ? En enor da biou ?

AR C'HALVEZ

Aes eo gouzout ne vo ket savet evit ar saout nag evit ar moc'h...  
(Pemoc'h FANCH a ya dre zindan) Si 'ta ! si 'ta ! pemoc'h fall !  
(C'hoarzadeg. Da FANCH) Sko war e vin ma kilo al loen... nemet en enor d'an Nomenoe.

HOLL

Nomenoe ? Nomenoe ? Piu an Nomenoe ? (Merc'hed yaouank gant boutegadou bleuniou ha briadoù brulu a dreuz al leur; kana a reont.)

YOUEN

Koll amzer.

YANN

Koll arc'hant.



MADALEN

Ha petra ' rin-me gant va viou ? Pask a zo tremenet.

FANCH

Va gwiz, er mintin-mañ, he deus bet korfad brenn. Eun tamm brao a goll evidoun.

AR PAOUR

Truez, va breudeur, ouz ar paour  
N'en deus nag arc'hant nag aour.  
N'en deus na kar  
Na par,  
Na diner nag aoz  
Evit tremen an noz.

YOUEN

Dal ! daou wenneg evit ma touchin va arc'hant.

AR PAOUR

Doue ho paeo.

YOUEN

Doue am paeo ? Doue am paeo ? Da Jakez ar c'higer eo d'am paea. Ar paour-mañ a ra goap ouz an dud. (AR PAOUR a zo aet diwar weled).

HOLL, taer

Foar ' vo !

MESTR AN ARCHERIEU

Peoc'h a vo ?

MADALEN

Ma kred d'eoc'h e tougin en-dro, d'ar gêr, ar viou dozvet gant nao yar, en eiz deiz ? Me ' zo kustum da vont war droad, o !

MESTR AN ARCHERIEU

Degasit ar viou-se, amañ.

MADALEN

Eun diner ar vi.

MESTR AN ARCHERIEU

Goude e vo gwelet.

MADALEN

Ola ! Ola ! roit d'in va viou en-dro.

AN TABOULINER, kavet gantañ e skritell

*...Hag an holl dud a zeuio d'ar foar, gwazed ha merc'hed, yaouank ha koz, a ranko chom war blasenn Redon da rei degemer da Nomenoe, evel ma tere, gant youc'hadennou ha strakadeg daouarn.  
(Ne wel ket gwall sklaer, eeuna a ra e lunedou. An dud a glask en em denna.)*

FANCH, d'e bemoc'h

Si 'ta ! D'ar c'hraou !

NAIG, d'he dañvad

Deomp d'ar gêr, mennig.

YANN, d'e vuoc'h

C'houst !

YOUEN, d'e ebeul

Hei !

MADALEN

Roit d'in va viou en-dro.

*(JAKEZ ar c'higer, o tont : roched plaket, chupenn mezer du ha gouriz glas.)*

YOUEN

He ! Jakez, degas d'in va arc'hant ha kemer krog e kabestr an ebeul. D'it eo al loen, korden hag all.

JAKEZ

D'in-me, siouaz ! N'oun ket bet prener, hizio. Gwelout a rez emañ gwisket va chupenn sul ganin ha nann va saro zu.

YOUEN

Bremaik, war gorre kër, e oa ganit da saro zu, ha foar hon eus graet hon daou.

JAKEZ

Penaos hon eus-ni graet foar hon daou, p'eo gwir ne vo ket foar, hizio, e Redon ?

YOUEN

Foar a zo bet graet etrezomp hag ez eus eun testeni : ar vlevenn touzet war dailher al loen, ha...

JAKEZ

...Ha lavaret em eus d'it kas en-dro, d'ar c'hraou, da ebeul da larda, rak n'eo ket kuilh awalc'h evit beza gwerzet e stal eur c'higer kristen.

YOUEN

Gaouier out ha laer ouspenn, evel an holl gigerien. Distaol da arc'hant pe n'out gour. (*Ar c'higer a dro kein.*) N'out gour ! n'out gour ! Klevout a ri c'hoaz ano ouzin.

(*An dud a zo o vont kuit.*)

MESTR AN ARCHERIEN, *d'ar gouerien*

Ha bouzar oc'h ? N'eus ket lavaret d'eoec'h chom var ar blasenn ? (*D'an archerien*) Stankit an hentou. (*An archerien a sent.*)

MADALEN

Roit d'in va viou.

AN ARCHER

Da sotal.

AN TABOULINER, *o kenderc'hel*

*...Ha kement loen, kement lur amann, kement vi, kement pesk degaset d'ar foar pe d'ar marc'had, a vo diwallet e kër Redon, betek ar c'huz-heol, kenkas o defe naon soudarded Nomenoe.*

Graet e Ti-Kër Redon  
gant Konwoion,  
Eskob ha Maer,  
d'an 30 a vezeven 845.

Dre urz hon Aotrou 'n Eskob ha Maer e stagan ar skritell ouz mogerou an ostaleriou. D'an dud d'ober anaoudegez ganti penn-dabenn. Ker e kousto d'an neb a rogo pe a saotro anezi.

FANCH

Bandenn voc'h !

MESTR AN ARCHERIEN, *d'an archerien*

Stagit al loened ouz tal an ostaleriou, ha lakait a gostez pesked, viou hag amann.

YOUEN

Va ebeul a zo Jakez e berc'henn.

YANN

Pa soñjan em eus, er gêr, foenn da charreat.

NAIG

Ha me, dilhad fank da brada.

MADALEN

Ha me 'm eus bronn da rei d'am mabig.

AN ARCHER

O ! o ! maouez, c'houi a zo plac'h yaouank koz...

MADALEN

Hag ez oun hag e chomin. An dra-se a zegas d'eoc'h droug-kof ?

MESTR AN ARCHERIEN, *d'an Archer Kenta*

Skrivit, archer : dek diner amand d'ar vaouez divergont-se.

AN ARCHER, *laouen*

Hoc'h ano, maouez, hoc'h ano ?

(Lien.)



*Pevare Arvest*

*War ar blasenn. An hevelep re. Ar breur  
GWENNOLL. JOB.*

YOUEN, *da Yann*

Peseurt darvoud an diaoul a zo degouezet hizio er vro ? Ha c'houi  
a gompren eun dra bennak ?

YANN

N'oun ket kustum da veza dientent, nemet hizio eo tapet va  
spered genaouek. Ne gomprenan ket eur vulufenn er pezh a c'hoarvez.

FANCH

Dont d'ar foar da zeiz ar foar, ha ne vo ket foar !...

NAIG

Dont d'ar marc'had da zeiz ar marc'had, ha ne vo ket marc'had.

MADALEN

An dra-se a zo eur mister.

MAIVON

Petra an diaoul a sinifi ar volz emeur o sevel war ar blasenn  
hag an elestr hag ar bleuniou ledet war al leurenn, evel da c'houel  
ar sakramant, ha piou eo Nomenoe ?

HOLL

Ha piou eo Nomenoe ?



GWENNOLL, o tegouezout

Mantrus ! mantrus ! n'ouzont ket piou eo Nomenoe !

MAIVON

Nann, 'vat, ha n'oun ket nec'het c'hoaz.

GWENNOLL

**Nomenoe a oa gwechall  
Gouarner, e Breiz, evit ar Gall;  
Hizio Nomenoe,  
E Breiz, a zo roue.**

YOUEN

Kompren a ran : an Nomenoe a zo paotr an tailhou.

GWENNOLL

Sevel a rae tailhou evit Bro-C'hall; nemet, edo o c'hortoz an deiz merket gant Doue evit terri ar yeo ha savetei ar vro, hag ober ouzomp-ni, Bretoned, gwazed dieub. An eur venniget a sonas en deveziou-mañ, ha paotred Nomenoe ha soudarded Karl ar Moal, ar roue gall, a zo bet emgann etrezo e kompezenn Ballon. Ar Vretoned o deus gounezet, Breiz a zo dieubet ha Nomenoe a zo hor salver. Hizio emañ an deiz da lida ar viktor ha bremaik Nomenoe, hor roue galloudek ha gloriüs, a vo degemeret e Redon gant bleunioù, kaniri, brall ar c'hleier ha sou an trompilhou.

HOLL

Diwar goust hol loened, hor pesked, hor viou hag hon amann.

FANCH

'M eus aon, manac'h yaouank, ez eus ac'hanoc'h eur paotr leun a zeskadurez hag uzet hoc'h eus moarvat ouspenn foñs eur bragou war skiñvier ar skolioù. Klevit 'ta : daoust hag e Breiz digabestret, ne vo mui savet a dailhou ?

GWENNOLL

E gwirionez, tailhou a vo savet, evel araok; eun tamm mat nebeutoc'h, a-dra-sur, eun tamm mat nebeutoc'h, hag e kefiou Breiz e vezint miret e-lec'h mont da leunia boujedenn Vro-C'hall evel gwechall. Setu.

HOLL

Ha !

GWENNOLL

Alvanet e chomit.

HOLL

Ya !

GWENNOLL

Perak ?

HOLL

Ne gomprenomp ket.

GWENNOLL

Ne gomprenit ket ar c'hemm a zo etre an daou gef, hini Bro-C'hall hag hini Breiz ?

HOLL

Nann ! Kef Breiz pe kef Bro-C'hall a zo ingal d'imp, p'eo gwir e paeomp, memez tra...

GWENNOLL

Bretoned digalon !

HOLL

...Ha kompren a reomp e vo atao goullo hor c'hef-ni.

GWENNOLL

Ne garit ket ho pro !

YANN

Da zeiz ar Viktor, me a zo laeret diwarnoun va buoc'hig Durham.

YOUEN

Ha me, va ebeul ken flour e vlevenn.

FANCH

Ha me va gwiz ken lart.

NAIG

Ha me va dañvadez gant he gloan hir a oa da veza touzet en deveziou-mañ.

MADALEN

Ha me melladou viou dozvet gant yer bet gant ar c'hilhog.

MAIVON

Ha me va brilli pesketaet gant an higenn e-tal Damgan.

SEZA

Ha me va amann druz, ribotet d'ar heure.

JOB

Ha me emañ va buoc'h o hala er c'hraou, hag a-benn bremañ marteze he deus kollet he leue. Ha n'oun ket evit mont d'ar gêr, war he zro.

HOLL

Ni a goll holl ouspenn eun devez labour.

YOUEN

Eun tamm brao a laer eo an Nomenoe. Ya ! eun tamm brao a laer, setu petra eo da Nomenoe.

GWENNOLL

Ha ma vefe goulennet diganeoc'h rei daou ebeul, diou vuoc'h ha daou bemoc'h e-lec'h unan ?...

YOUEN, YANN ha FANCH

O tri mil c'hast ! ...

GWENNOLL

Koulskoude e vefe eun enor evidoc'h kinnig ho loened da veza aberzet war aoter ar Vamm-Vro.

YOUEN

'M eus aon, kloareg, gant ho teskadurez, ez eo kollet ganeoc'h an diweza peadra eus ho skiant vat. Brao eo d'eoc'h prezeg ha kentelia pa n'hoc'h eus ket zoken eun diner da goll.

MAIVON

Ha marteze n'eo ket d'ezañ zoken ar roched a zo war e gein.

GWENNOLL

Eur roched all a zo war va c'hein ha n'en deus perc'henn nemedoun.

MAIVON

Ho kroc'hen ? Aberzit anezi 'ta, war aoter ar Vamm-Vro.

GWENNOLL

Graet em dije a galon vat, nemet n'em boa digarez ebet da vont d'an emgann, rak Nomenoe n'en doa ket ezomm eus soudarded war droad. Ouspenn eur Breton, avat, en deus roet, en deveziou-mañ, e groc'hen ha kroc'hen e varc'h.

MAIVON

Ya ! Izidor an anduilhenn a zo aet d'an emgann gant kazeg e dad.

GWENNOLL

Heñ ha meur a hini all.

MAIVON

Klevet em eus en eur zont d'ar marc'had gant va brilli, en deus kuitaet Izidor ti e dad hag e vamm goude distribilha eun dousen

anduilhennou hag eo tec'het dre noz ha dre laer, war gein ar gazez c'hell.

NAIG

E kompagnunez dispar emañ Salver ar Vro.

MAIVON

Koll Izidor ne vo ket eur c'holl bras. Nemet pa zeu soñj d'ezañ eus e gazez c'hell hag eus e anduilhennou, an tad a ya sot-ran.

GWENNOLL

Ma ne deu ket Izidor en-dro, e vo garanet e ano er peulvaen ha meulet da viken e gwerzioù ar varzed.

MADALEN

Kaerat tra d'an den maro !

SEZA *da* VAIYON

Ho pesked...

MAIVON *da* VADALEN

Ho viou...

MAIVON *ha* MADALEN, *da* SEZA

...a vo fritet gant hoc'h amann... war billig ar Vamm-Vro... evit leunia goude-se kof al lakepoded.

MAIVON, *da* WENNOLL

Daoust hag ar brilli, an amann, ar viou, an ebeul, an dañvadez hag ar wiz a vo meulet ivez e gwerzioù ar varzed, inosant ac'hanoc'h ?

GWENNOLL *a hej e ziouskoaz*

Ha draith ha frailh; ha freuz ha reuz; ha kant miñ Gall vil, trec'het, o tec'hi... (*Eürus*) Tan ar c'han, ha taran an diskau.

YANN

Me n'emaoun ket o vont da chom emañ da selaou an abostol-se o sevel litanioù.

YOUEN

N'oc'h ket evit mont d'ar gêr : ho puoc'h a zo pennasket ouz tal an ti all.

YANN

Me he dibennasko.

FANCH

Gwelit : an hentou a zo stanket gant kirri a-dreuz, ha diwallet gant archerien e-leiz.

YANN

Me a roio al lerenn d'ez i etre he divesker ken na lammo dreist ar c'hleuz mar deo stanket an hent, pe e toullgofe an archerien a gavo dirazi. (*Emañ an dud o vont kuit; archerien o tont.*)

EUN ARCHER

Penaos ? An dud o vont kuit ?

YANN

O ! n'emaomp ket; ne daimp ket d'ar gêr hep hol loened.

MADALEN

Hep va viou.

YANN

Me n'oun ket evit chom hep lavikat va divesker pe, kerkent, e vez maro va zreid hag e kouezan diouz va sav.

EUN ARCHER

Grit eur pennadig bale war ar blasenn evit divoredi ho kwad; arabat d'eo'h, avat, mont da zistaga al loened.

YANN, d'an ARCHER

O ! ne zistagin ket va buoc'h nemet mont a ran da drouc'ha d'ez i eur bec'hiad melchon ruz. Da genta avat ez an d'an ostaleri, amañ, da c'houlenn an aotre digant ar perc'henn. (*Mont a ra d'an ostaleri*).

YOUEN

Mont a ran ivez da c'houlenn eur pochad kerc'h evit va ebeul.

AN ARCHER

It, hag hastit afo.

FANCH

Ha me...

AN ARCHER

Ha c'houi, eur muzuliad brenn evit ho pemoc'h ?...

FANCH

Eeün-hag-eeün.

AN ARCHER

Ha goude e vo tro Madalen; ha goude tro Seza, ha goude tro Maivon. Ha goude en em gavin va-unan war ar blasenn. Aze emaoe'h, aze e chomot. Ma tegouez d'ho kwiz gwic'hal gant an naon. skoit d'ez i war he min ken na davo. (*YANN o tont er-maez eus an ostaleri a zistag e vuoc'h*). Oc'ho ! arabat distaga al loened.

YANN

Evit he c'has d'ar peuri an hini eo, rak n'eus ket er verouri melchon trouc'het na da drouc'ha.

AN ARCHER

Ma n'eus ket, he do ho vuoc'h eun diouer. (*YANN a adsteg an aneval hag a zistro d'an ostaleri*.) Da belec'h emaoe'h o vont ?





YANN

Da lavarout d'ar perc'henn n'eo ket druz awalc'h ar peuri en e bark.

AN ARCHER

Gouzout a ra petra a zo en e bark hep ma vo lavaret d'ezañ. Deuit amañ en-dro. (YANN a dosta en eur c'hrozmolat.)

AN OSTIZEZ, dre ar prenestr

Yann, servichet eo da vanne.

YANN

Emaoun o vont. (Ober a ra tro.)

AN ARCHER, da YANN

Dont a reot amañ pe me a ya d'eo'h? (YANN a dosta goustad. FANCH a gouez eus e sav war ar blasenn.)

AN ARCHER

Petra 'zo c'hoarvezet gant an den-mañ?

YANN

Skoet gant eun taol gwad dindan an heol bero.

AN ARCHER, da YANN

It buan da glask ar medisin.

YANN

Gwell eo dougen anezañ betek an ostaleri evit ma vo skullhet dour fresk war choug e gil. Eur fozad dour sin a dalvez eur medisin. (YANN, YOUEN ha JOB a grog e FANCH hag a zoug anezañ d'an ostaleri. MADALEN, MAIVON ha SEZA a glask ivez rei sikour. AN ARCHER d'ezo :)

AN ARCHER

Ar merc'hed-mañ a glask atao en em lakaat etre treid ar wazed. En em dennit! (Ar maouezed a chom. AN ARCHER da JOB:) Daou waz a zo barrek awalc'h evit dougen eun den. (JOB a ziskrog. Lezel a ra e dog da goueza.)

JOB

Aotrou Archer, Fanch a zo chomet e dog war e lere'h; mont a ran da gas anezañ d'e berc'henn. (Mont a ra.)

FANCH, d'an dougerien

Diwallit d'ober hirlink d'in dindan va c'hazellou pe e tirollin da c'hoarzin.

SEZA, da WENNOLL

It da gerc'hat d'in eur boked geot dreinek a viro ouz an arne da goueza war va amann. (GWENNOLL a gutuilh eun dournad geot. SEZA a lak geot en he fronellou hag o gwask gant he bizied. Gwada a ra he fri raktal.)

SEZA

O! aet oun sempl.

AN ARCHER

He fri o wada?

SEZA

Va fenn o faouta gant an droug.

MAIVON

Eun taol gwad all!

AN ARCHER, da SEZA

It ivez d'an ostaleri da c'houlenn dour fresk. (SEZA a gerz war he fouezig. MADALEN, MAIVON ha NAIG a ro skoazell d'ez.) Mont a ray hec'h-unan.

NAIG

Kazelik-kazelik e daio aezikoc'h. N'eo ket gwir, Seza gaez ?

SEZA

Gwir. (MAIVON ha MADALEN a ra tro; SEZA ha NAIG en em denn, kazel ha kazel.)

MAIVON, da VADALEN

Ha ni, amañ, hon diou, hon unan !...

MAIVON

Me n'oun ket evit chom pelloc'h em sav.

AN ARCHER

Ha c'houi a zo klañv, ivez ?

MAIVON

Klañv ha gwall glañv, siouaz ! Mez am eus.

AN ARCHER

Eur c'hleñved mezus eo moarvat ?

MAIVON

Mezus kenañ, aotrou archer... Gwelit pegen stardet eo va c'horkenn...

AN ARCHER

N'em boa ket taolet evez : o tougen emoc'h ?

MAIVON

Evit an ugentvet gwech, siouaz d'in ! Hag emañ hizio war an navet miz. Bubez ar gwraez war an douar a zo penn-da-benn eur menez kalvar.

AN ARCHER

Hag oc'h deñt evelato d'ar foar ?

MAIVON

Da gavout ar medisin, aotrou archer.

AN ARCHER

O ! gouzout a ran pegen start eo dougen bugale. Da zek mab oun bet tad, hag e-keit ma veze va gwreg o tougen, e veze ret d'in soursial ouz labour an ti goude graet labour ar park.

MAIVON

C'houi a zo eun den a galon.

AN ARCHER

Re a galon. (MAIVON en em glemm.) Emoc'h o vont da glañva ?

MAIVON

Kasi sur; n'oun ket evit chom pelloc'h em sav. Emaoun o vont da vankout ma ne azezan ket.

AN ARCHER

Deuit ganin ma kasin ac'hanoc'h da di ar medisin.

MAIVON

N'oun ket evit mont da di ar medisin p'eo gwir n'em eus ket eur gweneg zoken em godell. Arc'hant va brilli a oa evit paea ar medisin ha va brilli a zo bet dalc'het diwarnoun.

MADALEN

Pec'hed eo ivez derc'hel viou war goust eur baourez kaez.

AN ARCHER, da VAIVON

Rei a rafen d'eoc'h ho prilli en-dro, nemet n'eo ket me eo ar mestr; hag, ouspenn, ne gavot ket gwerz d'ezo. Ostiz an Trilonk a bresto d'eoc'h moarvat ar peadra. It d'e gavout.

MAIVÓN

Mont a ran; hoc'h ali a zo ali eur c'hristen mat.

AN ARCHER

Pouezit war va brec'h : aesoc'h e vo d'eo'h bale.

MAIVON

O ! mont a rin va-unan; me a zo boazet ouz ar boan hag ouz ar vizer; hag, ouspenn, ma tegouez d'eo'h beza gwelet gant ho mestr, e viot gourdrouzet, moarvat. Doue ho pennigo evelato, aotrou archer. (*Mont a ra da ostaleri an Trilonk.*)

MADALEN

O ! aon am eus amañ, va-unan, hep eur c'hristen em c'hichen, ha gant an diaoul ebarz va c'halon.

AN ARCHER

C'houi a zo o klask ober an diodez; hogen, amañ e chomot.

MADALEN

Sur awalc'h, n'oun ket bet gwall fur hizio. En eur zont d'ar foar, em eus graet an diodez. Pilet oun bet e foz an hent bras gant eur foeter-hent, ha bremañ en em gavan e stad a bec'hed marvel.

AN ARCHER

Mar doc'h bet pilet ha gwallet, ar pec'hed a zo d'ezañ.

MADALEN

Da genta e oa d'ezañ ha goude d'imp hon daou, rak kemeret em eus ivez plijadur.

GWENNOLL

O ! maouez fall.

AN ARCHER, *da* WENNOLL

Ha te a zo aze ivez ?

MADALEN

Ya, eur vaouez fall, siouaz d'in ! Keuz am eus avat ha doñjer ouz va fec'hed bras; ha mall ' zo warnoun mont d'an iliz da walc'hi va ene lor er gador-govez ha, goude, e dour ar binjenn.

AN ARCHER

Mat a reot.

MADALEN

Mont a ram eta, war eeün.

AN ARCHER

Ne viot ket kovesaet bremañ; n'eus beleg ebet en iliz.

MADALEN

Amzer en em brepari...

AN ARCHER

Grit sin ar groaz war ar blasenn ha skoit war ho peultrin, dirak Doue araok ober dirak ar beleg er gador-govez.

MADALEN

N'oun ket evit ober, gant dremm eun archer dirazoun.

AN ARCHER

Ha perak 'ta ?

MADALEN

Abalamour ne garan ket an archerien hag en eur welout dremm unan dirazoun e sevenan war an taol eur pec'hed marvel a gasont. D'an iliz ez in.

AN ARCHER

Gwelet e vo.

MADALEN

O ! den fallakr ! mirout ouz eur vaouez da vont da govez !... Ma konezan, amañ, dindan an heol bero, skoet gant eun taol gwad, e vo daonet va ene. Hogen, ma 'z an gant an diaoul, e pedan an Aotrou Doue da zaona ac'hanoc'h ivez.

AN ARCHER

Maouez, maouez, it buan d'an iliz; it dillo da govez !

(MADALEN *en em denn.*)

MADALEN, *d'ezi hec'h-unan*

Araok ma vezo kavet war an douar eun archer e spered digor, e vo degouezet fin ar bed; nemet hemañ, a gredan, a zo e-louez ar re c'henaoueka bet krouet a-viskoaz gant an Aotrou Doue. Ma kemerfe korf, en e spered, an holl sotoniou am eus roet d'ezañ da gredi, n'eo ket eur penn a vefe war e choug, nemet eur varrikenn. (AN ARCHER *en deus troet kein; MADALEN a red d'an ostaleri.*)

AN ARCHER

Hag e choman va-unan, war ar blasenn, hag oun bet lakaet gant va mestr da ziwall al loened hag an dud...

GWENNOLL

Me a zo amañ ivez; setu emamp daou.

AN ARCHER

Eur c'hloareg ne gont ket. (*Outañ e-unan*) Va-unan war ar blasenn, gwelloc'h em dije kavet en em gavout gant unan all bennak hag ober ganti eur pec'hed marvel e foz an hent bras.

GWENNOLL, *dinec'h*

Tan ar c'han;

Taran an diskan.

Klevout a rit, archer ? (AN ARCHER, *imoret, a dro kein.*)

AN ARCHER

Me a roy d'it diskan, bremaik. (*Outañ e-unan*) Mont a ran ac'han da ziwall ar c'hirri; aesoc'h e vo d'in. (*Mont a ra kuit. Eur gedour e tont gant eul luned hir : ken hir hag e gorf. Sellout a ra ouz eur skeulig, sko ouz lost an doenn.*)

AR GEDOUR

Ha petra a welin-me diwar lein ar skeul vihan-se ? Eur c'halvez ne oar ket, e fesoun, ez eo ret d'eur gedour pignat uhel, uhel, el laez, evit gwelout pell, pell. Aes eo gouzout n'eo ket bet er skol.

GWENNOLL

Ne c'hellfe konta nemet war e vizied niver ar bazinier en e skeul.

AR GEDOUR, *o konta*

Dek pazenn. Dek ha dek a ra ugent. Ugent a oa ret.

GWENNOLL

Gwir, gant ugent pazenn e vez unan eun hanter uheloc'h eget gant dek. Ha gwelout a reer eta eun hanter pelloc'h ?

AR GEDOUR

Kavout a rae d'in e oac'h bet er skol; 'm eus aon avat, n'oc'h ket bet hiroc'h eget an daolenn genta. An dek pazenn genta a zo, ouspenn dek, pell diouz an ugent. Selaouit : gant dek pazenn ne welin tra, p'eo gwir, diwar c'horre ar skeul, ne dizin ket c'hoaz lost an doenn; ha gant dek pazenn ouspenn e welin, dreist an doenn, betek penn an dremmwel... Ne oa ket eun divunadenn.

(GWENNOLL *a dro e gein, feuket. Ar c'halvez a dremen, eur plan-kenn gantañ war e skoaz.*) He ! kalvez ! Klev ! Petra ' welin diwar c'horre ar skeulig-mañ ?

AR C'HALVEZ

Lost an doenn, evel just. Eus lost an doenn e pigni gant da grabanou war c'horre an ti ha goude war c'horre ar siminal. Hag ac'hano e weli an dremmwel. Ne oa ket eun divunadenn. (*Ar c'halvez en em denn.*)



GWENNOLL, *o c'hoarzin goap ouz ar gedour*

Hi ! hi ! dek pazenn a zo awalc'h, ne oa ket eun divunadenn.  
Eul labous ha ne oar ket an tu-da bignat d'e glud !...

(*An Aotrou Konwoion, gant e zithad aour hag e vaz eskob.*)

KONWOION, *d'ar gedour*

N'emaout ket c'hoaz war c'horre ar siminal, ha marteze emañ  
lost soudarded Nomenoe ? (*Ar gedour a bign er skeul; KONWOION  
a sell en-dro d'ezañ*). Penaos ? Den ebet war ar blasenn ?

GWENNOLL

Eo, me.

KONWOION

Eur c'hloareg ne gont tra, nemet pa vez er skol.

GWENNOLL

Unan all bennak en deus lavaret an dra-se d'in bremaik...

KONWOION

Va-unan war ar blasenn !... Koulskoude eo stanket mat an  
hentou gant ar c'hirri ha diwallet gant archerien. Al loened a zo  
stag ouz an tiez... Da belec'h eta eo aet ar gouerien ?...

GWENNOLL

Darn a zo aet da gavout ar medisin, darn da gavout an apotiker,  
ha darn all da govez.

KONWOION

Souezet oun e teuont da govez e-kreiz ar sizun, ken lezirek ma  
'z int da zont da zerc'hent ar goueliou-berz.

GWENNOLL

Eur vaouez he deus graet eur pec'hed mezus en eur zont d'ar  
foar !

KONWOION

'M eus aon eo bet kovesaet war ar blasenn, ar aok mont d'an iliz ?

GWENNOLL

Ya ! an archer en doa c'hoant da c'houzout.

KONWOION

Ha c'houi, da glevout. Ar pec'hed a zo d'eoc'h.

GWENNOLL

O ! ne c'hell ket beza, ne c'hell ket beza, Aotrou 'n Eskob...  
Ar pec'hedou-se a vez atao d'ar merc'hed.

KONWOION

Mat, mat... It d'an iliz, ha goude, da di ar medisin, ha goude  
da di an apotiker, ha degasit d'in kelou eus ar gouerien, klañv hag  
all o c'horf pe o ene.

AR C'HLOC'HER, *o tremen*

Mont a ran da seni an añjelus.

KONWOION, *d'ar c'hloc'her*

Da unan emañ ?

AR C'HLOC'HER

Va mab hena a zo o tont war-lerc'h, gant alc'houezioù an iliz.

KONWOION

Ha prenet eta eo doriou an iliz ?

AR C'HLOC'HER

Sparlet int gant barinier houarn ha prenet ouspenn gant an  
alc'houezioù abaoe an ofercenn vintin. Kemennet hoc'h eus d'in,  
Aotrou 'n Eskob, prena doriou an iliz, da gement devez foar,  
abaoe m'eo bet laeret an arc'hant eus kef sant Yann Vadezour.

KONWOION

Mat a rez senti ouz va gourc'hemennou evel ouz gourc'hemennou  
an iliz. Hogen, mar deo prenet an noriou, n'eus den ebet  
an iliz ?

AR C'HLOC'HER

O ! den ebet, Aotrou 'n Eskob.

GWENNOLL

Piou a welan o vont du-hont, gant ar straed ?... Ar medisin hag an apotiker !... Gwelit, Aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Neuze, n'eus den ebet en o zi; da lavarout eo, den e ti an apotiker, den e ti ar medisin ha den ebet en iliz. Gaou hoc'h eus lavaret d'in.

GWENNOLL

Neuze, me an hini a zo bet gaouiet da genta.

KONWOION

Kit gant ar c'hloc'her da seni an añjelus. (*D'ar c'hloc'her*) Brall an tri c'hloc'h epad eun hanter eur, evel evit eun *Te Deum* bras. (*Ar c'hloc'her a sell gant fae ouz ar manac'h*). Ar c'hloareg-mañ a vrallo ar c'hloc'h bihan... Ha me a zo o vont d'ober an dro d'an ostaleriou da glask ar gouerien.

(Lien.)



Pempvet Arvest

*En ostaleriou. Ar gouerien, gwazed ha maouezed oc'h eva hag o c'hoari ' c'har-tou hag o kana.*

MADALEN

N'eo ket c'houi, Yann, eo bet darbet d'ho preur mont ivez da archer ?

YANN

Mont da archer pe da vengleuzier, da zibab en doa, rak re vihan e oa an tiegez evidomp hon daou abaoe m'hon eus, en hevelep deiz, kemeret an diou c'hoar da bried. Dre ma oan ar breur hena, an tiegez a oa d'in da dalvezout.

MADALEN

Hag e tibabas ho preur mont da denna an tao eus ar mengleuziou ?

YANN

Dre geuz ha dre ret... An nozvez kenta, p'edont en o gwele, hag o vont da seveni gant furnez sakramant ar briadelez, e wreg a reas d'ezañ toui na vije ket aet biken da archer. — « Goulennet em eus va flas, emezañ, gwall nec'het. — « Te a nac'ho da blas, emezi, araok ma vin, penn-kil-ha-troad, gwreg d'it, dirak Doue. Ma ne blij ket d'it, me a yelo warc'hoaz vintin, da gavout an Aotrou Konwoion da c'houlenn gantañ an divorza. »

Va breur, tommet e wad, ha mall gantañ beza dimezet, penna-benn, a asantas hag a douas mont da labourat er mengleuziou. Va c'hoar-gaer, laouen bras, a ziskouezas d'ezañ, neuze, eur valetenn a-istribilh ouz ar voger ha, war c'horre an armel, eur podig houarn, ruz-livet. « Er valetenn-se, emezi, e lakai bara amanennet hag, er podig, soubenn vat. » Hag, en eur ziroll da c'hoarzin, va c'hoar-gaer a lazas ar goulou... Ha goude, en denvalijenn, e voe bet eur abadenn c'hoari ha pokat.

Antronoz vintin, kerkent dibikouzet gantañ e zaoulagad, va breur a savas diouz e wele, imoret fall kenañ. Kredi a rae d'ezañ e oa bet c'hoariet, neizeur, gant e wreg, hag, en eur soñjal en amzer da zont, en doa keuz ha kerse d'e vuhez paotr yaouank... ha d'e dog archer moarvat. Va c'hoar-gaer a lavaras d'ezañ n'he doa dastumet, e-keit ma oa bet matez, e ti ar juloded, nemet eun nebeut gwenneien, peadra da brena ar pep reta; ha setu e tigase d'ezañ, evit e lodig, eur podig ruz hag eur valetennig wenn. En eur zimezi d'eun archer, e vije deut davetañ gant he daouarn goullo ha ne gave ket se eun dra a zoare.

O klevout kement-se, va breur a grafinas e benn, evel ma ne vije ket bet dilaouet e vleao abaoe e bemp bloaz. — « Ma ne vezan ket archer dindan ar gouarnamant, e vezin archer em zi, » emezañ. e kounnar bras. Hag edo o vont da vanna a-dreuz ar prenestr maletenn ha pod ruz, pa grogas e wreg en e vrec'h. — « En ano Doue, emezi, ma vrev ket ar werenn pe, henoz, en hor gwele, ni a vezo skournet... Pe, ma he brevez, me a ya war-eeün da glask an arche-rien. » — « Eun archer, eun archer, em zi, emezañ, fuloret... Sur, ne deuo ket dre doull an nor; ha, ma fell d'ezañ astenn e benn er prenestr, me hen dic'hongo raktal. » Hag e kemeras ar gontell gamm a zindan an dorz vara. — « Va gwazig, va gwazig karet, a lavaras neuze ar vaouez, gant he floura mouez, te a zo eun den a galon vat. Hogen, gwall brim war eun dro. Sell ouz da zremm er melezeour. Dourn prim ha kalon vat, a vez lavaret. Ma vefe lakaet eur sabrenn etre da zaouarn, te a rafe gwalleuriou. » — « Gwir eo, a lavaras hen, rak ma pakfen eul lank bennak o laerez pe oc'h ober droug d'an nesa, me hen toullgoffe hep damant ebet. » Sellout a reas dre ar prenestr evit gouzout pet eur ' oa pelloc'h; gant e gontell gamm e tronc'has eun tamur bara penn-da-benn d'an dorz hag e ledas warnañ eur bisadenn amann, rak ne oa ket bras ar pladad, hag e taolas las e valetenn dreist e choug. E wreg he doa aozet d'ezañ eur soubenn rous er podig ruz hag, evit ar wech kenta, va breur a yeas da labourat d'ar vengleuz. Hag abaoe, an tao a zegas bara en ti. Setu, Madalen, istor va breur. Ouspenn kant kwech, moarvat, em eus displeget anezi, betek-hen.

MADALEN

Kaer eo da selaou. Koulskoude ne oan ket o soñjal e vije bet displeget d'in hizio... Pa lavaren d'eoc'h : N'eo ket c'houi, Yann, eo bet darbet d'ho preur mont ivez da archer, ken d'eoc'h beza lavaret d'in : ya, ha netra ken. Respontet em dije : gwel a se evitañ hag evit e familh p'eo gwir en deus nac'het e blas.

YANN

Gwell a se evitañ, marteze; evit e familh, avat...

MADALEN

Evit e familh e vije bet eun dizenor ruz... Eun archer n'eo ket eun den; kredit ac'hanoun. En eur veva alao e kompagnunez an dud fall, penaos e c'hellfe e spered chom mat ? Me a lavar d'eoc'h, e galleg fraez : eun archer a zo eun den foutu. Evit d'ezañ da genta da veza eur spered uhel, e teu, bep eun tamm, da veza eur mell genaouek. Hag aes eo kompren : kenta tra a vez graet d'ezo eo spaza o spered.

HOLL o c'hoarzin

Spaza d'ezo o spered !...

MADALEN

Ya ! spaza o spered. Ma n'ouzon ket penaos, gouzout a ran avat, e vez graet.

SEZA

Dre sorserez marteze ?

MAIVON

An archer genaoueka, an hini a zo war ar blasenn... Ar maout a yafe gantañ, ma vefe kenstrivadeg.

FANCH

Na hopit ket ken herr; me a zo bet skoet gant eun taol gwad.

YANN

Ha me am eus kroget en ho penn.

YOUEN

Ha me en ho treid.

YANN ha YOUEN

Hag hon daou hon eus douget ac'hanoc'h... betek ti ar medi-sin !... (Diroll a reont da c'hoarzin. )

HOLL

Dour fresk, dour fresk war choug e gil !

FANCH

Dour fresk war choug va c'hil ha chufere e toull va gouzoug...  
(Eva a ra eur skudellad. Da vestrez an ti) : Goull eo va skudell.

JOB

Panevedoun, e oa kollet e dog, brouluzenn, bloukenn hag all.  
(C'hoarzin a ra).

SEZA

Va fri o wada; va genou oc'h eva...

NAIG

Ha me o rei skoazell da zougen ha da eva...

MAIVON

Ha me a zo dougerez !

MADALEN

Ila me a zo pec'herez !

MAIVON

Eiz miz hanter o tougen... va brilli em c'horkenn. (Tenna a ra  
ar brilli a zindan he c'horkenn.)

MADALEN

Ha me am eus graet eur pec'hed bras, er beure-mañ, e foz an  
hent bras !...

HOLL

E foz an hent bras, pec'hed ar vamm Eva. Evomp da yec'hed  
ar paour kaez Eva.

FANCH, YOUEN, YANN ha JOB

Evomp e ti ar medisin.

SEZA ha MAIVON

Evomp e ti ar medisin.

MADALEN

Ha me a ev, en iliz, e-tal ar gador-govez.

MAIVON

Ilag an archer-se en deus kredet ac'hanomp !...

MADALEN

Evomp da yec'hed breur Yann, p'eo gwir e nac'has mont da  
archer. (Eva a reont; mestrez an ti a ziskarg d'ezo chufere en o  
skudilli.)

HOLL, o kana hag o korolli

Gwell eo o ! gwin gwenn barr

Na mouar !

Gwell eo, o ! gwin gwenn barr.

Tan, tan, dir o ! dir... (hag all).

(Goude, ar baotred a azez ouz taol).

YANN

Ae ! paotred, kendalc'homp gant ar c'hoari ' c'hartou. D'in eo  
an dourn.

YOUEN

Ha d'in da drouc'ha.

YANN

Ha d'in da c'hoari... (C'hoari a ra) An dek pikez.

FANCH

Ha petra ' c'hoariin-me ? N'em eus ket zoken eur gartenn vat.

MAIVON

Kartenn vat ebet, hag e welan tri roue en e c'hoari !

FANCH

Tri roue ? Tri Nomenoe moarvat. Kartennou fall ruz. Ne c'hoariin  
ker gant Nomenoiou. (Banna ' ra e gartennou war an daol.)

HOLL o kana adarre hag o korolli

Gwell eo o ! gwin gwenn barr

Na mouar !

Gwell eo, o ! gwin gwenn barr !

Tan, tan, dir ! o dir ! (hag all).



FANCH

Eun taol gwad dizañjer ha marc'had mat.

YANN

Ha me da zoug dre da choug.

YOUEN

Ha me kement all dre ar penn all.

YANN, FANCH, YOUEN *ha* JOB

Ar medisin...

SEZA

...Va fri o wada...

MAIVON

...Ar medisin ha va brilli...

MADALEN

...Va fec'hed marvel hag an tad kovesour...

HOLL

...O deus kemeret lojeiz e boulienn an archer.

*(Chozradeg. Eva a reont. Yec'hedou. Kan ha koroll.)*

Gwell eo o! gwin gwenn barr  
Na mouar!

Gwell eo, o! gwin gwenn barr!  
Tan, tan, dir! o dir! *(hag all).*

*(An Aotrou 'n Eskob a dremen, er-maez, e-biou d'ar prenestr.)*

HOLL

Pssst ! An Aotrou Konwoion ! *(KONWOION en ti).*

KONWOION

Safar ha cholori a gleven bremaik, en ostaleri an Trilonk. Den ne respont bremañ ? Gwall sioul ha gwall davedek oc'h deñt da veza war eun dro, evit beza dibec'hed... Atao en ostaleriou, hag

atao an hevelep re : Yann, Youen, Fanch, Job ha maouezed zoken. Mezus eo : Madalen, Seza ha Maivon...

FANCH

An theol a zeve war ar blasenn, Aotrou 'n Eskob, ha sec'hed a oa deñt d'imp.

KONWOION

Hag eo diaes chom hep eva ?

FANCH

Ken diaes ha derc'hel eur bramm war beg eun ibilh, respet d'eo'h, aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Ibilha ' rin ho prammou, me. *(Rei a ra d'ezañ eun taol troad en e benn adreñv.)*

FANCH

Bennoz d'eo'h, aotrou 'n Eskob. *(FANCH a chom azezet.)*

KONWOION, *da* YANN

Ha c'houi a zo bet skoet gant eun taol gwad ?

YANN

Feiz, bet darbet d'in, aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Ha gant an heol o tevi, fri Seza a wade ?...

SEZA

Darbet d'ezañ, e gwirionez, aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Darbet d'ezañ... Darbet d'in... Ha c'houi, Maivon, ha kavet hoc'h eus ar pezh hoc'h eus kollet ?

MAIVON

O ! Aotrou 'n Eskob, n'em eus na kavet na kollet...

KONWOION

N'eo ket c'houi a oa dougerez, bremaik ? Ha Madalen bet darbet d'ezi, hervez ma lavare ?... Ha ! bremañ e stouit ho penn hag e chomit dilavar ?... Eur vez eo d'eo'h... Selaout eta... Me a zo apotiker, medisin ha kovesour, ha setu amañ al louzou... (O bou-taoui a ra.) Savit ha distalit ! Koll a ran amzer o sermoni, bep sul, diwar-benn ar vezventi... N'eo'h ket evit disterna zoken. Yann, pet ballnad hoc'h eus evet, pelloc'h ?

YANN, en eur vesteodi

O ! n'em eus ket evet, hizio, ouspenn dek skudellad.

KONWOION

Chufere bervet mat ?

YANN

Jistr plat, aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Hag ar jistr plat a vir ouzoc'h sevel ?

YANN

Emaoun savet em sav, aotrou 'n Eskob...

KONWOION

Ne welit ket zoken ho stad.

YANN

Gwelout a ran kenkoulez ha ma klevan, ha 'me a lavar d'eo'h emañ ho paz eskob war ho penn hag ho poned kornek en ho tourn. (KONWOION a ro d'ezañ eun taol baz war e benn.)

KONWOION

Setu aze war ho penn, ar vaz a welit war va hini. Plijout a ra d'eo'h ?

YANN

Ya, ya, aotrou 'n Eskob. (Mont a ra er-maez.)



KONWOION

Ar gwella louzou evit ar baotred-mañ a zo ar votez hag ar fust.  
(*Rei a ra eun taol baz-eskob da FANCH.*)

FANCH

Sevel a ran, aotrou 'n Eskob. (*Ober a ra an azvan da sevel.*)

KONWOION

Ha c'houi, Fanch, n'oc'h ket savet c'hoaz ?

FANCH

Eo, eo, aotrou 'n Eskob; emañ aet kuit. (*FANCH a sav hag a azez war eun dro.*)

KONWOION

Ha Youen ?

YOUEN

Eur bannac'hig am eus c'hoaz da eva.

KONWOION

Na bannac'h na tra.

YOUEN

Komandet eo.

KONWOION

Mar deo komandet, me a baeo, Kuit !

YOUEN

Emañ an itron o tont gant he ficher.

AN OSTIZEZ

Setu amañ, Youen, chufere nerzus. (*An Aotrou 'n Eskob a grog er picher hag a lonk ar chufere.*)

KONWOION

Doue ho paeo, itron.

YOUEN

Bremañ aval, ez an war-eeñ d'ar blasenn. (*Da FANCH*) N'ouzoc'h ket an enor bras en deus graet d'in an aotrou 'n Eskob ?

FANCH

Nann, 'vat.

YOUEN

An Aotrou 'n Eskob en deus evet va banne.

KONWOION, da FANCH

Ha c'houi e chom staget ho reor ouz ar skaoñ ?

FANCH

Banneou am eus evet, hag unan all am boa c'hoaz da eva...  
(*Kinnig a ra e vanne d'an Aotrou 'n Eskob.*) Evit anezañ, Aotrou 'n Eskob, evit ober plijadur hag enor d'in. (*An Aotrou 'n Eskob a grog er skudell hag he bann ouz darou al leur-di.* FANCH o vesteodi.) Bennoz Doue... Aotrou 'n Eskob... re em boa... evet...

AN OSTIZEZ

O ! va skudell !

KONWOION

Peoc'h d'in gant ho skudell, pe n'ho pezo ket ho pask, er bloaz a zeu. (*Kemer a ra krog en everien ha quinta a ra anezo er-maez a daoliou baz hag a daoliou treid.*) Er-maez ! er-maez ! pe, amañ, e vo emgann Ballon, bremaik. (*Chench a ra penn d'an taoliou ha d'ar skiñvier.*)

AN OSTIZEZ

O ! Va skudilli !

KONWOION, d'AN OSTIZEZ

N'en em chalit ket : ho kwaz, evit e gargou, a raio, evit an digoll, eun devez labour nebeutoc'h war an hent bras.

AN OSTIZEZ

Daou zevez hoc'h eus lavaret, Aotrou 'n Eskob ?

KONWOION, taer


C'houi a gomz, maouez, dre c'haou ha dre laer... Kent, ho kwaz a rae pemp devez ar bloaz war an hentou bras; hiviziken aval, e raio

dek devez leun... Klevet hoc'h eus ?... Kousta a ra k er ober bisk gant an Aotrou 'n Eskob... (D'an everien.) Hag an hini ne vo ket en em dennet, a-benn eur vunutenn amañ, eus ostaleri an « Trilonk », a raio dek gwech dek. (Ar gouerien en em denn, prez warno.) Servichit d'in, ostizez, eur banne flip; eur mell banne. Dont a ra tomm d'in o klask furaat an dud sot. (AN OSTIZEZ a ziskarg d'ezañ eur skudellad flip. An Aotrou 'n Eskob a ev.) Rabati a ran d'ho kwaz eun devez labour leun. D'an navet devez eta, kerkent aet an heol da guzat, e sammo war e skoaz e drañch hag e bal hag e vo graet gantañ e zeveziou kargou betek ar bloaz a zeu.

AN OSTIZEZ

Nao devez labour leun, elec'h pemp evel kent... Emberr, en ti-mañ, me ' bako bazadou...

(Lien.)



C'houec'hvet Arvest

*War ar blasenn.*

KONWOION

Eur vez eo gwelout stad an dudou-mañ... Ar re a zo gleb o bragez a zo pedet d'en em guzat a-dreñv ar re all. (*Ar gouerien a sell an eil ouz egile.*) Daoust hag hoc'h eus klevet?... A-dreñv ! Ha c'houi, ivez, a-dreñv !... Ha c'houi, Seza, ha c'houi, Maivon, ha c'houi, Yann, araok. (YANN *ha* MAIVON *a gil.*) N'eo ket a-dreñv ! araok a hopan d'eoc'h !

YANN

Me a zo gleb va bragez.

KONWOION

E pelec'h, neuze ?

YANN

A-dreñv.

KONWOION

An tu adreñv ne sell ket ouz an tu araok. Chomit el lec'h m'emaoc'h. (*An holl a glask kila hag en em denna eus ar blasenn, hep beza gwelet.*) Chom a reot el lec'h m'emaoc'h ? Boulc'hurun ! A ! kompren a ran : an tu adreñv a zo tostoc'h ouz an ostaleri. (*Da WENNOLL.*) Kloareg, it da sparla doriou an ostaleriou.

GWENNOLL

Ma sparlan an noriou, Aotrou 'n Eskob, dre belec'h eta e teüin-me er-maez ?

KONWOION

Dre ar prenestr.

GWENNOLL

Dibrenn ar prenestrou, ne vo droug ebet. Toullou ar prenestrou a zo re striz evit korf ar beizanted. (*D'ezañ e-unan :*) A ! ma vije bet ar baotred-mañ gant Nomenoe, en emgann Ballon, furoc'h e vije



bet d'ezañ mont da goc'ha war gribenn eur menez. (*Sellout a ra ouz an heol.*) An abardaez o tont. Hep ! gedour ! ha tostaat a ra soudarded Nomenoe ? Gedour, bouzar out ?

AR GEDOUR, *moredet war c'horre eur siminal*

Hoo ?

KONWOION

Emaint o tont ?

AR GEDOUR

Petra ?

KONWOION

Me da betraio, bremaik. Kloareg ! kloareg !... (*Sellout a ra en dro d'ezañ.*) Pelec'h ar c'hast emañ ar c'hloareg-se ? (*Hopal a ra, ken a gren kement den war ar blasenn.*) Gwenn... oll !...

GWENNOLL, *a bell*

Y...a ! (*O tont.*) Petra a zo c'hoarvezet, Aotrou 'n Eskob ?

KONWOION

Asa ! hemañ a vez atao gant e betra...

GWENNOLL

Eus va gwerz hoc'h eus ezomm, Aotrou 'n Eskob ?

KONWOION

Klevit !... Pa vo savet ganeoc'h ho kwerz, kan ha diskan, adskrivit anezi war baper seiz, ha, ware'hoaz, el liorz, d'ho plegadenn vintin, ec'h arboellot evelse eun nebeut deliou kaol. Daoust ha preñnet hoc'h eus dor eun ostaleri bennak ?...

GWENNOLL

Ya; hini an « *Dour Benniget* ».

KONWOION

Hini an « *Dour Benniget* » !... N'eus ket en ho penn daou wennegad a skiant prenet. Prenna eun ostaleri ken kristen ! N'ou-



zoc'h ket ez a va c'harabasenn da brena di he sukr, he c'hafe hag he butun malet, hag an holen evit salla an dour benniget? It war-eeñ, da zigeri an ostaleri-se. An noriou a zo da veza serret ha prenet gant ar spar hag ar morailh, a zo doriou ar bistroiou milliget a vez gwerzet enno souchenn, odivi ha rom; ar rom flêrius a vir ouz ar gristenien, da genta gant ar flip, ha da c'houde gant ar flep, da zarempredi ofisou ar sul...

GWENNOLL

Re wir, Aotrou 'n Eskob.

KONWOION

Mar deo gwir, pe n'eo ket, an dra-se ne sell ket ouzoc'h ha ne c'houlennan ket ganeoc'h eun ali.

GWENNOLL

Mont a ran, eta, da zigeri eun ostaleri ha da serri ar re all.

KONWOION

N'eo ket evit digeri pe serri an noriou am boa galvet ac'hanoc'h. Roit d'in ho stilo... N'en em chalit ket; n'eo ket evit sevel gwerziou an hini eo. (*Kemer a ra stilo GWENNOLL, skriva a ra war eun tamm paper. Lenn a ra :*) « Ha gwelout a rez soudarded Nomenoe? » Mat. Ar baperenn-mañ ouz lost ar bir a zihuno ar gedour. (*Staga a ra ar baperenn ouz lost eur bir ha goude e stign eur wareg... Ar bir gwareget a c'hloaz fesken ar gedour, peurgousket war c'horre ar siminal.*)

AR GEDOUR, tizet

Aiou!

KONWOION


Ha! ha! dihunet out? Kompren a rez?

AR GEDOUR

Petra 'zo?

KONWOION

Lenn, hag e weli. (AR GEDOUR a zisplant ar bir diouz e fesken; lenn a ra ar baperenn. Sellout a ra ouz an dremmwel.)



AR GEDOUR

Ne welan Nomenoe ebet.

KONWOION

Na soudard ebet?

AR GEDOUR

Emaint harpet, er c'hroaz-hent pella.

KONWOION

O tiskuiza?

AR GEDOUR  
Nann; en ostaleri.

HOLL  
Chañs o deus !

KONWOION  
Gounezet o deus eur mell banne, gant al labour vat o deus graet.

HOLL  
Ha ni hon eus gounezet ivez eur banne bras, o chom d'labour.

KONWOION, *d'ar gouerien*  
Gourlañchennou an diaoul, aze e chomet dilabour, sec'h ha kras.  
(*D'an archerien :*) Archerien, taolit ivez ha bezit prest d'o flemma  
gant ar skourjez. (*An archerien a hej o fenn, badaouet mat. D'an*  
*GEDOUR :*) Pet ez eus anezo ?

AR GEDOUR  
Eun dousen vat, Aotrou 'n Eskob.

KONWOION  
Siouaz d'in ! Pelec'h eta eo chomet ar re all ? (*D'ar GEDOUR :*)  
War droad pe war gezeg ?

AR GEDOUR  
Bremañ emaint divarc'het; ar c'hezeg a zo o peuri el letonenn.  
Iervez ar pezh a welan gant va luned, skuiz int moarvat.

KONWOION  
Ar soudarded ?

AR GEDOUR  
Nann; ar c'hezeg. Ne welan soudard ebet mui, rak an hini  
diweza anezo a zo aet e-barz an ostaleri.

KONWOION  
Ha ne welez ket Nomenoe ?

AR GEDOUR  
Penaos eo gwisket Nomenoe ?

KONWOION  
Evel ar re all eo gwisket; nemet Nomenoe a zo disheñvel diouz  
ar soudarded all; rak eun den bras eo, eur pezh mell hini bras  
meurbet, eus an uhela tout.

AR GEDOUR  
Ne welan seurt hini en va luned hir. Gwelout a ran o tont dre  
an hent doun soudarded all. Sur awalc'h e taleint ivez en ostaleri  
ar c'hroaz-hent, rak abaoe m'emaint war weled d'an ti, e kertzont  
buanoc'h.

YANN  
Gant ma teuint arak an noz.

YOUEN  
Atchoum !

FANCH  
Aôôô !...

JOB  
Ouf !

KONWOION  
Petra ' c'hoarvez gant ar re-mañ ober geizou ?

YOUEN  
Siferni a ran gant ar sec'hed.

FANCH  
An digor-genou a zo deut d'in gant ar sec'hed ruz.

JOB  
Skuiz-maro oun aet gant ar sec'hed kras.

HOLL  
Sec'hed hon eus !  
(*An archerien en em denn dre guz.*)

AR GEDOUR  
Alo ! alo ! soudarded a zo deut er-maez eus an ostaleri.

' Maint ' tont ?

HOLL

AR GEDOUR

N'emaint ket, rak en-dro int aet e-barz an ostaleri.

KONWOION

Perak int deut er-maez hag aet e-barz en-dro ?

AR GEDOUR

Evit eun dizour e oa.

HOLL

Ni hon eus ivez c'hoant dizoura.

KONWOION, *d'ezañ e-unan*

Ne deuin ket a-benn da zerc'hel ar baotred-mañ war ar blasenn. Archerien ! archerien ! Feiz ! brao emañ ganti !... N'eus archer ebet war ar blasenn !... (EUN ARCHER o tont d'an ampoent) Eus pelec'h emañ o tont ?... Respont 'ta.

AN ARCHER

Aotrou... aotrou... 'n Eskob...

KONWOION

Besteod out ?

AN ARCHER

O !... n'oun ket.

KONWOION

Besteod ha leun !

AN ARCHER

O ! eul lipadennig.

KONWOION

Gwall deo eo neuze da deod. En em denn ac'han ha kae d'ober eur c'houk e-tal ar bern plouz. (AN ARCHER a gerz en eur vralla.)

FANCH

Me ' zo mezo evel an archer.

KONWOION

Kamm ki pa gar, ha, mar doc'h mezo e tizevot. (*Rei a ra d'ezañ eun taol botez en e benn adreñv.*)

FANCH

Aiou !... Ehanit skei, Aotrou 'n Eskob... Emaoun o sevel.

KONWOION

Gwelout a rit : divezvet oc'h.

AR GEDOUR

' Maint ' tont !... ' Maint ' tont !...

KONWOION

Poent hastout, paotred... Ahe ! renk-oc'h-renk, evel kaol er park.

GWENNOLL

Ar Breton

A sko garo...

Eun eston

A dud varo !

Gallaoued

Lazet

Dre gant ha dre vil ;

Hag en ifern o ene vil.

KONWOION

Bravoc'h e vefe d'eoc'h mont betek an iliz da renta gras da Zoue eget chom war ar blasenn da sevel koniri... ' Maint ' tont, paotred ! Chomit plom en ho sav ha reut war ho kilhorou ; sounn ho penn, eur mousc'hoarz war ho muzellou, ho tivrec'h eeñet a-heñ ho korf, palmou ho taouarn troet ouz araok hag ar biz bihan a-dreñv gwri ar bragez. Ha pa zegouezo Nomenoe war ar blasenn, stlakit ho taouarn an eil ouz egile ha youc'hit herroc'h herra, betek chom berr-anal : Nomenoe — Oe — Oe — Oe !!!...

JOB

Ha ! ha ! ha ! Ni ' zo labrigadlaklak !  
(C'hoarzadeg.)

KONWOION

N'em eus ket lavaret d'it diroll da c'hoarzin.

JOB

N'oun ket evit mirout.

KONWOION

Ha perak 'ta ?

JOB

O soñjal eo kounnaret, pelloc'h, va gwreg er gêr, war dro ar  
vuoc'h o hala, ha me oc'h ober an azen amañ, hep beza kavet eul  
louzaouer zoken. Ma lavaran d'ezi oun chomet e Redon, da c'hortoz  
Nomenoe, e resevin ar spanell ouz kostez va fenn.

GWENNOLL, o klask echui e werz

D'an daoulamm ruz,  
Mire'hed kuladus,  
Ar weski etre o dent.  
D'an daoulamm ruz,  
O tenna tan eus mein an hent.

(ARCHERIEN o tont.)

ARCHERIEN

' Maint ' tont.

KONWOION

Ha poent e oa d'eoc'h dont ivez.

YANN

Gant ma ne zalc'hint ket va buoc'h ganto.

MAIVON

O ! kamm eo o c'hezeg.





YOUEN

Allas ! va jao d'in-me a vo moarvat diouz o c'hoant.

SEZA

War gezeg klañv !

MADALEN

War gezeg ar c'hagn !

NAIG

War gezeg an Ankou !

GWENNOLL, *gant tristedigez*

N'int ket moarvat soudarded Nomenoe, rak n'eus banniel ebet ganto ! Ar vrezelourien wirion o tont eus an emgann, a vez atao kaer evel arc'haelez hag o mirc'hed a rizink hag a lamm gant ar joa.

YANN

Ar giz-se a oa arak ar brezel, paotrig; abaoe ar brezel avat ez eus chenchet penn da galz traou.

KONWOION

Ya; kezeg ar c'hagn, mac'hagnet gant an Ankou... Arabat ankou-nac'haat. Ar c'hezeg-se a zo gloriüs ha gaoliet int gant soudarded Nomenoe.

JOB

Glorius pe gezeg ar c'hagn, an dra-se a zo ingal d'in; sevel a ra krug ennoun o soñjal emañ va buoc'h o hala er c'hraou ha marteze a-benn bremañ ez eo kollet gant he leue.

YANN

Pet leue he deus halet pelloc'h, abaoe emaoe'h o tibuna d'imp litanioù ho loen ?

YOUEN, *da* JOB

C'houi a goll ho leue; me a goll va ebeul.

YANN

Ho leue marteze a zo marvel; va buoc'h, sur, a vo drebet.

KONWOION, *a dremen dirak ar gouerien*

(*Da* FANCH) Savit ho penn 'ta ! Perak emaoe'h stouet evel eur pec'her dirak e govesour ? En deiz hizio ne die ket eur pec'hed — na zoken veniel — trubuilha koustiañs eur Breizad, ha d'an holl bodet amañ war ar blasenn, e roan eun absolvenn vras.

FANCH

N'eo ket gant pec'hedou eo pounner va fenn. Gant ar vez e rostan o welout Jos al Louarn e-touez ar vrezelourien.

YANN

Ya, gast ! Jos al Louarn... An eil, war an trede renk.

FANCH

Ne saludin ket eur mezhier a deu du-mañ, bep lun, da jistra, ha ne zistal ket eus an ti ma ne vez ket roet d'ezañ e doullad. (*Ar soudarded a zo deut tost.*)

MADALEN, *d'ar soudarded, goapaus*

Ha c'houi eo soudarded Nomenoe ?

EUR SOUDARD, *difoutre*

Ya !

MESTR AN ARCHERIEN, *d'eun archer*

Chomit hep paea he viou d'ezi. Petra ' c'hoarvez gant ar Vaden-se goulenn eun dra bennak digant ar vrezelourien ?

GWENNOLL, *d'ar soudarded*

Ha deut eo ar maout ganeoc'h ?

EUR SOUDARD

Ya !

GWENNOLL

Oe ! Oe ! Gloar da Nomenoe !

KONWOION

Petra ' c'hoarvez gant ar c'hloareg-mañ rei an ton ? (*D'ar gouerien*) Oe ! Oe ! (*Ar gouerien a chom mudet.*) Fanch, c'houi a zo kollet ho teod ganeoc'h ?

FANCH

Ya !

KONWOION

Youc'hit : Oe ! Oe !

FANCH

Ne rin ket. Jos al Louarn a anavez va mouez. (*Stoui a ra e benn hag e dog war e zaoulagad, gant aon da veza anavezet.*)

KONWOION, *d'ar gouerien all*

Alo ! youc'hit holl a vouez uhel : Oe ! Oe !

HOLL

Ne raimp ket, ma ne ra ket Fanch.

KONWOION

Archerien, divudit ar re-mañ gant ar skourjez. (*Ar vrezelourien a zo deut war ar blasenn dirak ar volz enor. Merc'hed a strew bleuñiou, dirazo, a fozadou. Kaniri.*)

EUR C'HADOUR, *souezet*

Petra ' sinifi ar gouel-mañ ? (*Ar gadourien a ziskenn diwar varc'h.*)

KONWOION

Hep ! gortozit. Chomit war varc'h.

AN HOLL GADOURIEN

Skuiz omp.

KONWOION

Ha Nomenoe ?

AR GADOURIEN

N'eus Nomenoe ebet ganimp.

KONWOION

Allas ! Jazet eo bet en emgann ?

AR GADOURIEN

Kollet ganimp en eur zont en-dro. (*Lod anezo a ziskenn diwar varc'h.*)

KONWOION

Chomit war varc'h pa ne vefe nemet eur vunutenn. Pehini ar mestr goude Nomenoe ?

AR GADOURIEN

N'eus ganimp na mestr na kabiten; ni a zo holl soudarded raz. (*An Aotrou 'n Eskop a zispleg evelato eur baperenn hag a ginnig anezi da WENNOLL.*)

KONWOION

Ma n'eus Nomenoe ebet, koulz eo d'in mont war eeün d'an eskopti. (*Da WENNOLL*) : Kemer ha lenn. (*En em denna a ra.*)

GWENNOLL, *o lenn*

Nomenoe, kadour dispar, mestr bras...

FANCH

Kloareg, kloareg, n'emañ ket dizro an Nomenoe.

GWENNOLL

Ingal eo; al lid-mañ a zo *coram populo ad usum populi*. (*Kenderc'hel a ra.*) ...mestr bras, degaset gant Doue evit savetei ar Vro... (*Ar gadourien a ziskenn holl.*)

AR GADOURIEN

Ni hon eus naon.

MADALEN

Kenavo d'am viou !

NAIG

Den ne glevo mui va dañvadez oc'h ober béêê...

YANN

Pa n'eus Nomenoe ebet, evit piou eta eo bet savet ar volz-enor-  
mañ ?

FANCH

Evit va femoc'h.

JOB, *gant eur c'hri, evel glozaet*

Aiou...

YANN

Taget oc'h gant eur pistig ?

JOB

N'eo ket se; va gwreg he deus pladet d'in eun taol spanell ouz  
kosteiz va fenn.

(Lien.)

## Seizvet Arvest

*Eun hent doun da vare ar c'huz-heol.  
Laboused : an eostig war lein ar wezenn;  
al laouenan war ar skourr izela, mouil-  
c'hi, er c'harz, o kana... Ar rakerig, er  
foenneg, a zo tavet.*

AN EOSTIG

Laouenan, laouenanig, perak e kanez ken diwezat e serr-noz ?

AL LAOUEANAN

Kement a levenez a zo em c'halonig ma n'oun ket evit mirout,  
eostig noz, da gana.

AN EOSTIG

Mouilc'hi, mouilc'hi, perak e c'houitellit, diehan, er c'hili, en  
noz o tostaat ?

EUR VOUALC'H

C'houitellat a reomp, eostig noz, da sklerijenn ar mintin, rak  
goulou an deiz a zo o para en dro d'imp.

AN EOSTIG

N'emañ ket ar goulou deiz, rak bremaik e nozo ha, d'ar mare-  
mañ eus an deiz, ar mouilc'hi, kludet er girzier, a vez tavet o  
mouez.

EUR VOUALC'H

P'emañ an heol o sevel pe bremaik e nozo, eostig-noz, eostig-noz,  
n'omp ket evit tevel.

AN EOSTIG

Rakerig, rakerig, te a gane da bep serr-noz, kuzet er fenneier sin; rakerig, rakerig, perak ne glevan ket da vouez, en noz sioul ha klouar ?

AR RAKERIG

Eostig-noz, eostig-noz, n'oun ket evit kana; va c'han a gavan divalo en eur serr-noz ken kaer. Va c'han a zo gwall zister ha da delenn ken flour.

AR VOUALC'H

Laouenan, laouenanig, kludet war da skourr, hag a nevez en noz-mañ, pa ganomp ha pa ganez ?

AL LAOUEAN

Eostig, eostig-noz, war lein ar wezenn o telenna, hag a nevez dindan an oabl laouen ?

AR VOUALC'H

Eostig, eostig-noz, diwar lein da wezenn, ha klevout a rez eur burzud o taskrena en avel ?

AN EOSTIG

Laboused, labousedigou, eur burzud a glevan o taskrena en avel. Enkrez a zo em c'halonig, enkrez hag estrenvan, rak ar burzud a gren en avel, a zo levez pe glac'har... Tio ! Tio ! tio !... Kanit flour; kanit sioulik, pa welan ar brini o c'hoari en dro d'imp... Tio ! tio ! tio !... Sioul ! sioul ! sioul !...

AL LABOUSED

Ar brini o koagal ! Bezomp sioul en deliou.

AR VRAN GENTA, o tremen

Roâg !... roâg !... Geoliad gwad !...

AN EIL VRAN

Geoliad gwad !... Geoliad gwad !...





AN EOSTIG

Sioul ha sioulik, labousedigou !... Tremenet ar brini, hogen ar sparfell o tostaat.

AR BRINI, *pell*

Geolliad gwad !...

AR SPARFELL

Eur burzud a zo ganet hizio war zouar Breiz-Izel. Eur burzud a gan en avel hag, evel eun aezenn, a dremen war ar maeziou.

AN EOSTIG

Souezet omp o klevout ken flour ho mouez, henoz.

AR SPARFELL

Henoz al laboused, sparfell evel eostig, a dle kana flour. Henoz ar sparfilli evel an eostiged a dle kana ar burzud, levenez penn-dabenn.

AN EOSTIG

Hag ar burzud ganet neuze e Breiz-Izel ?

AR SPARFELL

Gwelet hoc'h eus brini o tremen. Brini lor, brini du, leun a gig hag a wad. Brini lor, brini du, mezo gant gwad fall, gwad fall.

AL LABOUSED

Gwad fall, gwad fall.

AR SPARFELL

Gwad fall a vezo gwad mat. Gantañ an ed, e Breiz, a ziwano timat; a ziwano stank, a ziwano puilh ha, da vare an eost, e kano ar meder, perc'henn laouen ha dianken.

Perc'henn en e bark, perc'henn en e di, evel ki en e groc'hen. Edon bremaik o nijal us da gomezenn Ballon hag eus an oabl em eus gwelet, war ar gomezenn, lazadeg veur meurbet. Gwelet em eus o koueza, toullgofet da viken, gwelet em eus o tec'hout, spou-ron en o c'halon, ar re a oa kent ar vistri e kompezenn Ballon. Gwelet em eus o tec'hout a dreuz ar parkou ed, ar re o doa hadet hag a soñje medi...

P. PÉRON



AL LABOUSED

Ha gant piou eta ez int bet argaset ?

AR SPARFELL

Gant ar re a labourer kent, hep diblega o c'hein evit sec'hi an dour c'houez diouz o zal hag eva eur vozad dour e stivell ar vali. Gant ar sujidi, adsavet da vistri : gant ar Vretoned.

AL LABOUSED

Ha Breiz a zo digabestret ?

AR SPARFELL

Digabestret e Ballon. Hiviziken, eta, e Breiz penn-da-benn, e vo ar peoc'h d'an dud ha d'al laboused war o c'hud... Kanit, labousedigou, kanit dirak ar sparfell, kanit ar burzud a zaskren en avel. (*Kan al laboused.*)

NOMENOE, o vont gant an hent

Eun dudi eo klevout al laboused, henez. Daoust hag en noz e kanont pe en deiz o para ? Daoust ha laboused a glevan, pe va c'halon o kana ? N'ouzon ket va-unan gant al levezeg a zo oc'h em gwaska. An noz en dro d'in a zo par d'an deiz; rak noz ha deiz a zo levezeg ha bennoz. Hag en dro d'in e kan kement loen, e kan kement tra : al laboused a richan, an deliou a vouskan, ar geot a drid war c'horre al leton hag ar vein a zasson evel ma kan va c'halon. (*Streboli a ra. Hag, evel o tihun*) : Petra an diaoul a zo etre va divesker ?

IZIDOR

Me !

NOMENOE

Piou, te ?

IZIDOR

Eur c'hristen : Nomenoe.

NOMENOE

Me eo an Nomenoe.

IZIDOR

O ! neuze, emamp daou. Evelato, mar dout an Nomenoe gwirion, me ' zo Izidor penn-da-benn, Izidor al Lank, eus ostaleri « An Trilonk ».

NOMENOE

Izidor ha kabiten.

IZIDOR

Kabiten ha mezo. War va c'horf emañ a-dreuz an hant da n'oun ket evit sevel... Ha n'oun ket evit sevel gant an droug a zo ennoun.

NOMENOE

Ha droug a zo, henez, er c'habiten Izidor ?

IZIDOR

Korfad droug a zo ennoun. Ma vijen bet en imor vat, n'em bije ket evet korfad. Droug a zegas korfad, ha korfad am eus evet ha setu an droug a vir ouzin sevel.

NOMENOE

Ha perak, kabiten, ac'h eus evet korfad ?

IZIDOR

... Me ' gare eur bennherez e kastell Penn-ar-C'hoad... Hag e krede d'in e oan karet ganti.

NOMENOE

Hag hi n'az kare ket ?

AL LABOUSED

Hag hi, n'hen c'hare ket...

IZIDOR

Hag hi n'am c'hare ket... Kredi a rae d'in koulskoude e vijen bet karet ganti... Henoz eta, goude ar viktor, ez oun aet d'he gwelout. — « Me a zo kabiten, emeve, mao an tamm ac'hanoun. » — « Kabiten hep leve », a respontas hi.

AL LABOUSED

Kabiten hep leve, a respontas hi.

IZIDOR

« Kabiten hep leve ne vo ket gwaz d'in. »

AL LABOUSED

Kabiten hep leve ne vo ket gwaz d'in.

IZIDOR

Ha setu emañ pladet e kreiz an hent hep leve na danvez, hogen gant chufere ha levez...

AL LABOUSED

Gant chufere ha levez.

IZIDOR

...rak me a zo bet anvet kabiten gant an Nomenoe.

AL LABOUSED

Kabiten gant an Nomenoe.

IZIDOR

Ha keit ha ma vevin, eur bennherez ne vo morse gwreg d'in.

AL LABOUSED

Ne vo morse gwreg d'in.

NOMENOE

Na gemer ket da bried eur bennherez e Breiz-Izel, pe e savo dizale kerse ha keuz d'it. Eur c'habiten e Breiz a gavo koantiri all.

AL LABOUSED

Koantiri all.

NOMENOE

Va breur-me a zo dimezet d'eur bennherez pinvidik, ha goude emgann Ballon ez oun aet d'he gwelout. « Avalou douar, emezi, a vo fritet d'it ? » Evit ar moc'h e oant poazet, ha d'in-me kinniget. — « Bennoz Doue, emeve, mar deo goulo va c'hof, e c'hellan gant nerz kalon chom hep koueza eus va sav. An dibri hag an eva a zo eun distera. » Goude e lavaris d'am breur ha d'am c'hoar-gaer : — « Roit d'in evit va dougen ar marc'h reuta a zo er marchosi, rak mire'hed am eus krevet dindanoun en emgann ha leoiou am eus d'ober hag ez oun aet gwall skuiz. » Neuze, avat, va c'hoar-gaer, pennherez ar Gili, a lavaras d'in gant he digareziou : — « Ar marc'h a zo klañv, ar gazeg dihouarn ; n'hon eus, siouaz ! er c'hraou, loen evit ho tougen. » Ha setu henoz e kerzan war droad, trec'her e gwirionez, hogen tremeniad.

IZIDOR

Pa zegouezi e Redon, lavar d'am zad ez eo gwasket va c'halon. Lavar d'ezañ ouspenn e tegouezin, evel kustum, divezat.

NOMENOE

Kenavo d'it, Nomenoe... Rak henoz Nomenoe a zo kement den a gar Breiz en e galon hag e ene. (NOMENOE a gerz.)

IZIDOR

Siouaz d'in ! n'oun ket Nomenoe hag a-boan oun kabiten. Me ' zo Izidor an Trilonk, gwall vrudet e Redon. (Santout a ra eun touseg o fichal dindan e zourn, war an hent.) Salud d'it, va mignon.



Te ' zo ivez marteze mezo ha kabiten? Respont ac'hanoun 'ta... Pa n'am respontez ket, te a zo enebour. M'emaout dre da nerz da unan, chom en da sav, me a ya d'it; m'emaout dre vertuz an diaoul, kae kuit.

AN TOUSEG

N'oun ket eur gourener; hogen, eur paour kaez touseg a glask freskadurez war c'horre al letonenn. (IZIDOR a floura kein al loen gant palv e zourn.)

IZIDOR

Perak e klaskez freskadurez pa grenez en da groc'hen?

AN TOUSEG

En da zourn e krenan, rak aon am eus ouz an dud... Dec'h en em gaven e kichen Penn-Ar-C'hoad o kempenn eul liorz en eur zebri ar melc'houed a vastoc'he ar c'haol... Eur paotrig am gwelas hag a grogas ennoun. War benn eur plankenn am lakaas ha gant e droad e skoas war ar penn all, hag uhel el laez e oan bet gwintet. War eur bern plouz e kouezis; panevet-se, e vijen bet krevet.

IZIDOR

Touseg, va mignon, an dud e Penn-Ar-C'hoad, n'int ket tud a feson. Lez ar melc'houed hag an holl amprevaned da vastoc'ha o liorzou ha kae da gêr Redon, da liorz an Trilonk. Eno ez eus ivez kaol da gempenn, hag eno, va mignon, ne vo ket graet droug d'it.

AN TOUSEG

Gweñ e kavan, va den mat, chom pell ouz kêr ha pell ouz he liorzou ha kerzout a ran buan da c'houkori er c'harz gant aon da veza flastret gant eun den divergont.

IZIDOR

Me a glask kerzout ivez, hogen n'oun ket evit sevel; n'oun ket bet gwintet diwar benn eur plankenn hag e kav d'in koulskoude

ez eo brevet va izili. Ma vijes aet da Redon ez pije lavaret d'am zad eo debret an anduilhennou, lazet ar gazeg c'hell, hag ar mab Izidor gwall-glañv gant eur reoriad. Kenavo 'ta, va mignon... E liorz Izidor e vijes bet kabiten war an holl dousegi. Tou... seg... Va mignon... Tou...se...gi... Koan...tiri... Kenavo... (En em rei a ra da gousket. An touseg a gan er geot.)

(Lien.)





*Eizvet Arvest*

*Da hanternoz, dirak ostaleri « an Trilonk ».*

NOMENOE, *er-maez*

Oe !

EUR SOUDARD, *er prenestr*

Piou an istrogell a zo en traoñ, o hopal : oe ?

NOMENOE

Oe ! Oe !... Digor ' vo, pe ne vo ket ? (*Skei a ra war an nor.*)

MESTR AN TI, *e fri er prenestr*

Archer pe lakepod ?

NOMENOE

Nomenoe.

MESTR AN TI

Kae e-biou gant da hent, Nomenoe hag all. Leun eo an ostaleri ha n'eus kambr ebet mui. (*NOMENOE a sko war an nor.*)

NOMENOE

Digor a c'houlennan. (*MESTR AN TI, eur penn-baz en e zourn, a zeu da zigeri.*)

MESTR AN TI

Digeri a ran an nor, nemet ker e kousto d'it da abadenn gousk.

NOMENOE

Ne zigor ket re abred an nor.

MESTR AN TI

Petra ' c'hoarvez ganit dont da zihuni ar gristenien d'ar maremañ eus an noz ?

NOMENOE

Digor frankoc'h dor da di. (MESTR AN TI a glask skei gant e var. Gant e gleze, NOMENOE a drouc'h d'ezañ e var, e harz e zourn.) Kerse a vefe ganin mougna eur Breizad e Breiz.

MESTR AN TI

Deuit tre, deuit tre, gant aon e pakot yenijenn !

NOMENOE

Atchoum !

MESTR AN TI

Deuit tre, deuit buan ! Siferni a rit gant freskadurez an noz.

NOMENOE

Ma sifernan, gant poultrenn an ti an hini eo. Lez digor an nor.

MESTR AN TI

Digor pe demzigor ?

NOMENOE

Digor frank, a lavaran d'it... Daoust hag ez eus en ti peadra da zibri ?

MESTR AN TI

Feiz, nann 'vat. va den. N'eus tra ebet en ti. Nag eur vrurunenn vara nag eun drailhenn gig.

NOMENOE

N'emañ ket amañ neuze ostaleri « an Trilonk ? »

MESTR AN TI

Ti an degemer mat, va den, rak n'eus ken a voued henoz en ti : soudarded Nomenoe o deus skarzet piz an doailh hag ar bailh.

NOMENOE

Goude ar fest hag ar cher vat a zo bet amañ henoz, ne chom ket zoken eun dilerc'h da dalvezout eur begad ?

MESTR AN TI

Begad ebet, siouaz d'eoc'h !

NOMENOE

Ya, siouaz d'imp ! rak ar c'hounidegez goude ar pred a gouez dalc'hmat e godell an ostiz.

MESTR AN TI

Gounidegez ? Siouaz d'in ! Drebet hag evet o deus ar soudarded. Drebet e-leiz o c'hof hag evet e-leiz o geol, ha m'em bije kredet goulenn diganto eur bennoz Doue evit va faeamant, em bije sur resevet va lod eus ar fest; nemet fest ar vaz e vije bet.

NOMENOE

Te ' zo teo, n'out ket ?

MESTR AN TI

Evelato...

NOMENOE

Petra ' vank d'it c'hoaz ?

MESTR AN TI

Evelato, eur c'hristen mat n'eo ket boazet da laerez, ha kemer hep paea a zo laeronsi.

NOMENOE

Gwelout a ran e kouskez en iliz epad ar sermoniou, panevet-se ez pije gouezet, mar deo kemer hep paea, pa vez ret, evit debri, eur pec'hed, hervez lezenn an dud, n'eo ket eur pec'hed hervez lezenn Doue... Hag ouspenn, paeet out bet; n'out ket ? Hag e klemmuskez ?

MESTR AN TI

Paeet ? Gwerc'hez Vari !... Paeet ?... Me garfe, ya !

NOMENOE

Kent e oas Gall bremañ out Breizad. Kent e oas sklav ha kouer vil, hag out nobl hiviziken. Setu aze madou burzudus. Ha piou en deus gounezet ar madou-se ? Daoust hag out bet e kompezenn Ballon ? Daoust hag out bet mac'hagnet ha toullgofet ?...

MESTR AN TI

O ! Itron Varia !...

NOMENOE

Te a zo chomet teo ha livrin. Hogen, ar re o deus gouzañvet naon ha sec'hed, gloaz ha skuizder, daoust ha paeet int bet ? Hag e varc'hatez d'ezo an aluzen ?

MESTR AN TI

O ! ne ran ket; ne ran ket...

NOMENOE

Hag ar re a zo marvet evit ar Vro, daoust ha paeet e vint eur wech bennak ? Bez disoursi, avat; ar re-se a zo divlaz boued an douar d'o staoñ ha ne deuit ket da doull da zor da c'houlenn ganit o faeamant. Nemet ar Vretoned a chom beo o deus sec'hed ha naon. Kompren a rez ? (*Teurel a ra e gleze noaz war an daol.* MESTR AN TI a sell gant spont ouz ar c'hleze.) Ar ber-se a ra aon d'it ?

MESTR AN TI

O ! ne ra ket, evit d'ezañ beza dremmet lemm. Nemet eur c'hleze a vez boazet, a gredan, da veza gouhinet.

NOMENOE

Va c'hleze-me a vez atao digouhin, nemet gouhinet e vefe e kof ar C'hallaoued.

MESTR AN TI

Brrr !... O ! divemor ac'hanoun. Dont a ra soñj d'in bremañ ez eus war ar strilh eun anduilhenn boaz.

NOMENOE

Mar deo poazet ez eo arboellet.

MESTR AN TI

Arboellet e oa evit va mab Izidor a zo aet da c'hoari brezelekaat gant eun Nomenoe. N'eus forz; boul'hit anezi hep damant d'ez i hag hep damant d'ezañ. Izidor en eur vont d'ar brezel, beure mat, ha kousket an holl en ti, a zistribilhas kement anduilhenn a oa ouz ar c'hrog. Sachit warni 'ta; Izidor en deus bet e lod.

NOMENOE

Gwall geuz en do d'ez i marteze, ma o c'hare kement.

MESTR AN TI

M'en do keuz, neuze n'eo ket bet lazet ? Soñjal a raen e vije deut en-dro va mab Izidor da zibri anduilhennou all. Difounn el labour, difounn en emgann, Izidor n'en deus roet lamm da C'hall ebet, ha kredi a rafen kentoc'h ez eo aet da jistra dre ar vro. Ken da se e teuy ar gazeg c'hell diampech en-dro.

NOMENOE

Ha ken da se eo bet lazet ar Vretoned all ? Bez dinec'h avat : Izidor a zo beo pesk, evitañ da veza gloazet. Ar gazeg Fanni an hini a zo marvet.

MESTR AN TI

O ! Doue ! Doue ! Doue !... Lazet va c'hazeg Fanni ! Penaos e kasin teilh bremañ d'ar park ?... Pa deuo Izidor en-dro, e vezo lazet ivez... O ! eur c'houezenn a zo war va zal, hag e santan emañ va izili o vervel...

NOMENOE

Mestr an ti, Izidor a zo bet kalonek.

MESTR AN TI

Izidor, kalonek ? Eur burzud ! Ha c'houi a anavez anezañ, pa lavarit d'in e ano hag ano ar gazeg c'hell ?

NOMENOE

Dre c'houez saourus an anduilhenn-mañ ec'h anavezan anezañ.

MESTR AN TI

Gwir eo, n'eus ket er vro, dek leo tro war dro, eun ti hag eur vaouez par d'am gwreg da c'houzout an tu d'ober anduilhennou ken saourus. Ha c'houi neuze hoc'h eus sikouret Izidor da zibri an anduilhennou all, pa anavezit o blaz ?... Plijadur a ra d'in gouzout n'int ket aet e kof al lankidi.

NOMENOE

Klev, mestr an ti. Kreizeiz e oa pe wardro; naon am boa kement hag henoz ha gwall domm e oa an abadenn. Gallaoued a gleiz, Gallaoued a zehou, Gallaoued dirazomp... Hini ebet a-dreñv. Izidor a oa em c'hichen. Hor bouc'hilli a c'hoarie hag ar C'hallaoued a goueze, faoutet o fenn pe dic'houget ha flastret ker kent gant hern ar c'hezeg...

MESTR AN TI

Gant Fanni marteze ?... Eur gazeg ken sioul !

NOMENOE

Eur c'hrogad start, m'hel lavar d'it. Hep tamm e oamp abaoe peder eur war-n ugent, ha nebeut ha nebeut e skoas hor bouc'hilli goustadikoc'h. « Lamm d'ezo ! a hopas d'in Izidor. » Rei lamm hep dibri tamm a zo diaes moarvat. « Lamm d'ar c'hagn ! » a hopas adarre Izidor. Hag e tennas eus e roched eun anduilhenn en he fez. « Dal ! emezañ, an anduilhenn-mañ a zegaso nerz d'it. » Hag e gwirionez e teuas d'in nerz nevez. Hor bouc'hilli a skoas, a drouc'has, a zic'hogas hag ar viktor, goude an draillh, a chomas a du

ganimp... O ! Brao e oa gwelout ac'hanomp, war varc'h, eun anduilhenn en eun dourn hag eur vouc'hal en eun dourn all...

MESTR AN TI

Mat e oant, n'eo ket gwir ?

NOMENOE

N'eo ket mat : dreis! e oant; ha, m'hen tou ruz, talvezet o deus d'ar vro. Panevet da anduilhennou, ne vije ket bet c'hoaz echu ar brezel.

MESTR AN TI

Gwerc'hez Vari ! Va anduilhennou o deus gounezet ar brezel ha savetaet ar vro ? Biskoaz kement all.

NOMENOE


Ya ! O deus savetaet Breiz. Paneveto e vijemp bet semplet, mil bell ' oa, gant an disvoued, ha foutu ar vro.

MESTR AN TI, d'ezañ e-unan

Hag hen maro e vije bet foutu ar vro ?... Ne gomprenan ket gwall vat.

NOMENOE

Evit e anduilhenn eo bet anvet Izidor kabiten.





MESTR AN TI

Va mab Izidor kabiten ?... Ha me a lavare n'en dije graet netra vat en e vuhez ? Kabiten ?... Ha pegeit amzer e chomo kabiten ?

NOMENOE

Keit ha ma karo.

MESTR AN TI

Emañ savetaet va mab. Kabiten keit ha ma karo !... Eur vicher da zegas avi da veur a julod. Ha gant piou eta eo bet anvet kabiten ?

NOMENOE

Ganin-me.

MESTR AN TI

Ha piou oc'h neuze ?

NOMENOE

Nomenoe a vez graet ac'hanoun.

MESTR AN TI

Allas ! alas ! ha me a grede d'in e oa anvet Izidor kabiten, ha me a chome emañ da selaou an den-mañ a zo kollet gantañ moarvat ar peurrest eus e skiant vat... Ha me a zo bet diot awalc'h evit kredi eo bet gounezet ar brezel dre berz va anduilhennou... (Da NOMENOE) Ha pelec'h eta emañ bremañ Izidor pa n'emañ ket c'hoaz dizro ?

NOMENOE

War hent ar gêr emañ, ha, ma n'emañ ket c'hoaz dizro eo abalamour ez eo skuisoc'h eget ar soudarded all.

MESTR AN TI

War droad pe war vare'h ?

NOMENOE

War droad evel e vestr, p'eo bet lazet Fanni.

MESTR AN TI

Allas ! avañset kaer beza kabiten p'eo bet lazet Fanni. Eur gazeg ken reiz ha ken flour he blevenn. Ha n'eus bet roet kazeg all ebet d'ezañ en he lec'h ? Va Fanni gaez !

NOMENOE

Ouspenn eur perc'henn en deus kollet e jao, en deveziou-mañ, hag ouspenn eur paotr ampart a zo henoz maro en e groc'hen ha bez kristen ebet da virout ouz bleiz hag ouz bran... Dal ! (Rei a ra da VESTR AN TI an anduilhenn hanter zrebet.)

MESTR AN TI

N'eo ket mat ?

NOMENOE

Arboell an hanter all evit da vab Izidor.

MESTR AN TI

O !

NOMENOE

Evit ar c'habiten. Azeza a ran war an oaled, ha te, lamm en da wele da ankounac'haat da c'hlae'har en da gousk.

MESTR AN TI

Avel a c'houez dre doull an nor, va den, hag e skourno an oaled.

NOMENOE

Ma c'houez an avel, ne varvo ket an tan.

MESTR AN TI

Eur gwele kalet a vezo korn an oaled.

NOMENOE

Daoust hag ez eus en da di gweleou blot ?

MESTR AN TI

Blot n'int ket; nemet leun int... Evelato, mar doc'h kabiten evel Izidor...

NOMENOE

... Lez ar soudarded d'ober korfad kousk. (*Azeza a ra e kough an oaled.*) Tan ! tan ! dir ha dir !

MESTR AN TI

Aon am eus ouz an den-mañ. N'emañ ket gantañ, moarvat, e holl skiant vat. (*Da NOMENOE*) El laez... er grignol, n'eus ket a soudarded; nemet eur foeter-hent gourvezet war eur c'holc'hed pell, ledan awalc'h evit daou.

NOMENOE

Mat ! pignat a ran da c'hrignol ar foeterien-hent.

MESTR AN TI

Nozvez vat ! Evit netra ha gant joa e roan d'eoc'h lojeiz.

NOMENOE

Ha ro degemer mat d'ar brezelour — soudard pe gabiten — a zeuio arak an deiz da c'houlenn lojeiz diganit.

MESTR AN TI

Ne chom ket zoken eun hanter golc'hedad pell da rei d'ezañ da c'hourvez.

NOMENOE

Te a roio d'ezañ gwele mestr an ti. Ha ma lavar d'it : me eo Nomenoe, kred anezañ ha tomm d'ezañ eur mell skudellad flip, rak Nomenoe a zo henoz kement Breizad kalonek en deus argadet evit ar Vro. (*Pignat a ra. MESTR AN TI a ya da serri an nor.*) Mezo out pe divemor ? Ha n'em eus ket lavaret d'it lezel digor frank an nor ? Aon ac'h eus ouz ar bleizi ?

MESTR AN TI

Ar bleizi pevarzroadek ne reont ket aon d'in.




#### NOMENOE

N'eus ket bleizi all er vro. Ar C'hallaoued a zo bet lazec betek an hini diweza. Ma krenez gant aon ouz o anaon, lak va c'hleze a dreuz toull an nor. (*Rei a ra d'ezañ e gleze. Kerzout a ra d'al laez.*)

#### MESTR AN TI

Nomenoe a zo henoz kement Breizad kalonek en deus argadet evit ar Vro. Va mab Izidor en deus argadet; Izidor a zo kabiten... Ha me a zo tad da Izidor. Mar deo hemañ marteze an Nomenoe gwir, ni a zo ivez Nomenoeiou... (*E toull an nor da dasmantou an noz*) : Tostait holl, digor frank eo an nor... Deuit tre, deuit tre... Bleiz ouz ber; Gall ouz krog ha Breiziz ouz taol !... Me ' zo tad da Izidor !... Me ' zo ivez eun Nomenoe... Ha ne deuy enebour ebet en tu-mañ d'ar c'hleze-se... hini ebet, na bleiz, na Gall.

(Lien.)



Navet Arvest

*Eur grignol. Kailhar ha gweleou kevnid.  
Tristidigez ha paourentez. A-dreuz an  
doënn dismantret, al loar a sil he skleri-  
jenn. NOMENOE a zo e benn kurunennet  
a stered. War c'horre ar plañcheiz, eur  
foeter-hent a zo gourvezet ha morgous-  
ket; huñvreal a ra.*

AR FOETER-HENT, *dre e gousk*

Me ' zo eur paour-kaez den e-unan war an douar.

N'em eus ket anavezet va mamm, n'ouzon ket piou eo va zad  
ha n'oun dare pelec'h oun ganet. Me ' zo hep kar na par, hep micher  
na stad.

Em bro, me ' zo eun divroad, hag eun emzivad; eur foeter-hent  
e bro va zad.

AN AWEN

N'out ket eur paour kaez den war an douar.

N'emaout ket hep micher na stad hag, e Breiz, n'out ket eun  
divroad.

AR FOETER-HENT

Mouez tener, mouez diamen, ha lavaret hoc'h eus n'oun ket  
eur paour kaez den ?

AN AWEN

Eur blanedenn dispar a zo tonket d'it war an douar.

AR FOETER-HENT

Siouaz d'in ! Siouaz d'eoc'h ! mouez flour, mouez diamen, e  
Breiz ez oun bet hag e vin eur paour kaez den.

AN AWEN

Te 'zo kar d'ar Vreiziz, ha karet ganto holl, en deiz hizio dreist holl, barz dianav.

AR FOETER-HENT

N'oun ket barz, siouaz d'in ! rak n'ouzon ket skriva ha n'ouzon ket lenn. Me 'zo eur foeter-hent hag eur paour kaez den. Me 'zo ar reuzedika den a zo hizio war zouar Breiz. Rak Breiziz o deus argadet, Breiziz o deus gouzañvet, Breiziz a zo bet lazet...

Ha me, ar foeter-hent, me a zo yaouank ha yac'h, ha me a zo divac'hagn !...

AN AWEN

N'eo ket mezus beza yac'h, na beza divac'hagn. Breiziz o deus argadet, Breiziz o deus gouzañvet, Breiziz a zo bet lazet : tonket e oa.

Te a zo beo hervez da blanedenn.

AR FOETER-HENT

Planedenn c'haro !

AN AWEN

Da vuhez a dalvezo.

AR FOETER-HENT

Talyoudus war an douar buhez eur foeter-hent !... Hogen, pedet am eus, ha Doue a bardono d'eur Breizad ma ne deo ket bet skuilhet e wad.

AN AWEN

Foeter-hent, foeter-hent, da vuhez a dalvezo.

AR FOETER-HENT

N'em eus na leve na danvez.

AN AWEN

Danvez a zo alies paourentez. Hizio te 'zo eun den pinvidik war zouar Breiz. Pinvidik en da galon, pinvidik en da ene, hag evit se, n'eus ezomm na danvez, na leve.

AR FOETER-HENT

N'ouzon ket skriva, n'ouzon ket lenn; me 'zo eur paour kaez den penn-da-benn.

AN AWEN

N'eus paour kaez den ebet e Breiz digabestret. Peorien, foeterien-hent, hailhebodet a zo savet a-berz Doue da renk an uhela noblañs, ha te, ma n'ouzout ket skriva, ma n'ouzout ket lenn, te a oar kana ha te a gano da vro.

AR FOETER-HENT

Ma n'ouzon ket skriva, ma n'ouzon ket lenn, gouzout a ran kana ha me 'gar va bro.

AN AWEN

Ha te a gano.

AR FOETER-HENT

Kerzet em eus dre Vreiz, pirc'hirin reuzedik, gwall bleget dindan e blanedenn. Goapaet oun bet er c'hêriou pa dremenet o klask labour. An aluzen a c'houlennen ha meur a wech 'eo bet nac'het ouzin. Pa ganen e-tal an tiez ha pa c'houlennen goudor evit an noz war deil tomm ar c'hraou, e tistagas ar Gall ar chas war va lerc'h. Hogen, ne vagan ket kasoni, kaer ma veze a-wechou klevout ar chas o harzal en noziou klouar.

Kousket em eus en hañv, er balanegon, e c'houez vat ar bleuniou o flourat al tetonenn; hag e kousken, dianken. D'ar pellgent e saven dibreder hag e kerzen, e briz-heol ar beure, eürus ha skañv, da heul va huñvreou.

Henez, avat, me 'zo ar reuzedika den a zo war an douar. Kenvroiz a zo bet lazet evit ar vro a garan ha va nerz d'in-me a zo chomet didalvez, evit d'in beza yaouank ha divac'hagn.



E Breiz ez oun eun den a netra a gerz dre an hentou doun, e frond ar geot hag ar bleun, en eur vaga huñvreoù goullo. Karet em bije beza chilgamm, bouzar, mogn pe dall, neuze moarvat e vijen bet kavet dibec'hed.

AN AWEN

Foeter-hent, foeter-hent, dibec'hed emañ dirak Doue; da ene a zo direbech ha dinamm hag, hiviziken, e Breiz, ne vi ket eun den a netra.

Te a gerzo dre ar Vro ha te a gano Breiz nevez.

AR FOETER-HENT

Breiz nevez a ganin...

Kerzet em eus, paour ha dister, dre an hentou doun. En targo-siou daougroummet, e c'houtelle ar mouilchi hag ouz o c'hlevout e tride va c'halon hag e kanen evelto. Penn-da-benn d'ar c'hleuziou, e safrone ar gwenan e skourrou ar gwez dero, lugernus o deliou gant ar mel o tivera, ha balafenned a c'hoarielle hag a sune ar bleud e bleunioù ar mouarou. Hag evel balafenned, huñvreoù hedro a c'hoarielle en dro d'in, pa heden an hentou doun.

Me ' oa an eürusa den, neuze, war an douar.

AN AWEN

An hentou doun a gani.

AR FOETER-HENT

An hentou doun a ganin...

An heol a floure man al lezou; an heol a grene e brouskoad ar c'hleuziou. Heol a bare e kalon ar foeter-hent.

AN AWEN

An hentou heoliet a gani.

AR FOETER-HENT

An hentou heoliet a ganin...

D'ar beure e veze arc'hantet ar geot gant gliz an noz. Hag e vez lavaret e tegas eurvad ar c'hlizenn arc'hantet d'ar c'henta tremeniad. En hentou e tremenen araok an dremenidi.

AN AWEN

An hentou arc'hantet a gani.

AR FOETER-HENT

An hentou arc'hantet a ganin...

Traoniennou glas a hedis, nadoziou-aer a welis o voredi war ar c'hedigou meur. Hag e selaouis mouskan ar gwaziou en naoziou ha trouz sklintin ar stivelloù er pradou...

Bourrus e oa eva e boz va dourn an dour sklaer a virbilhe a-hed ar radenn-naer, diouz an dirbinou.

AN AWEN

An dourioù a gani.

AR FOETER-HENT

An dourioù a ganin...

D'an diskar, dre wall amzer, koumoul en oabl ha yen an avel, e koage hag e c'harme ar brini hag ar c'hefeleged-mor us d'ar parkeier hadet; ha, da serr-noz, e yude ar bleizi er roziou.

AN AWEN

Ar brini hag ar bleizi a gani.

AR FOETER-HENT

Ar brini hag ar bleizi a ganin...

Pa zegoueze d'in beza aet skuiz o vale, entanet ma oa va zreid ouz mein an hent, e kerzen dre ar c'hoadou, palennet o gweno-dennou gant kinvi ha deliou melenet. D'ar goañv, e kaven eno disklav, ha distan dre hañv bero; d'an nevez-amzer e lusen; hag e kistinen, d'an diskar.

Ar c'hoadou o c'hilaza, an heol klouar o para, an deliou o veleni,  
o kraza, o koueza; ar glao o veradi...

AN AWEN

Ar c'hoadou a gani.

AR FOETER-HENT

Ar c'hoadou a ganin...

Al Jann e bleun a alaoure an diribinou; ar brug hag ar hrulu  
a oa tan war an torgennou. Noz ha deiz, a-hed ar bloaz, e veze  
dirazoun buhez ha kaerder Breiz.

Breizad ebet n'anavez ha ne gar e vro, evel-doun-me, ar foeter-  
hent.

Pa zistroe, goude o labour, ar gouerien c'hall d'ar gêr, e welen  
diwar ar gorreou an tiez o vogedi hag ar maeziou o voukaat, e  
mored an noz.

Ha me, ar foeter-hent, e pare warnoun ar stered evel daoulagad  
ar sent, enaouet er baradoz.

AN AWEN

An noziou sioul hag ar stered a gani.

NOMENOE

An heol a gani...

Foeter-hent, foeter-hent, n'out ket eun divroad nag eun emzivad.  
Breiz eo da vamm, Douc eo da dad, ha da vro a gani...

En hentou doun a bar an heol war o letonenn flour, e kano  
hiviziken ar portezour o vont da gas d'ar c'hêriou ar bleud hag ar  
bara; e skoasilli digompez an hentou doun e kano rodou an tum-  
porellou o tougen an teilh da struja ar parkou. Ar c'hirri o strakal  
hag o klemm gant ar bec'h, ar mire'hed o reuda el loc'hennou hag  
o tenna tan-ouz mein an hent hag ar charretour o pec'hi a gani.

AR FOETER-HENT

Al labour a ganin.

NOMENOE

Er foenneier glas e skrijo ar falc'h er geot hir hag e youc'ho ar  
baotred goude ar falc'hadegou.

AR FOETER-HENT

Al labour a ganin.

NOMENOE

Er c'hoadou, palennet o gwenodennou gant kinvi ha deliou me-  
lenet, e kano bouc'hal ar c'hoadour hag ar skolp a lammo, evel  
bleuniou, e bep tu. Ar gwez a zrasko en eur goueza hag ar skourrou,  
en eur c'hourvez, a blado ar man hag al lus. Gant delc'h an dero,  
avat, e vo steuet binviou hag e korf ar fao e vo tailhet bouteier evit  
an Vreiziz a valec, kent, diare'hen.

AR FOETER-HENT

Al labour a ganin.

NOMENOE

War c'horre ar menez, el lannegou, e vo maradeg ha, goude tan  
ar brug, e luc'ho aour an ed. Ha diwar an diribinou, e weli betek  
serr-noz, ar chatal o peuri dibreder, en traoniennou sioul. Rak,  
argadet hon eus, hag ar bleizi a zo bet argaset ha lazet. Ar bleizi a zo  
bet lazet, foeter-hent, hag ar stered a zo kouezet diouz an neñv.

E Breiz nevez, an heol a gani.

(Ar stered a parv en dro da benn NOMENOE; dremm ar c'hadour  
a zeu da veza skedus evel an heol.)

AR FOETER-HENT

Ar stered a zo kouezet diouz an neñv. An heol a ganin. (Dihun a  
ra. Koueza a ra war benn e zaoulin.) Te 'zo Nomenoe, an heol e  
Breiz Nevez. An heol a ganin.

NOMENOE


Bennoz d'it, foeter-hent !  
Gwelloc'h eget danvez, gwelloc'h eget leve a gavan ez ene.

(*Outañ e-unan.*) E Breiz digabestret, gant eur paour nemetken, oun bet anavezet. Ar gouerien o deus danvez a zo, siouaz d'ezo ! en o c'halonou, dienez. Paneveto, e vije bet, pell ' zo, dieubet ar Vamm-Vro. En arme Nomenoe, he deus roet lamm d'ar Gall, ne oa nemet peorien ha foeterien-hent. An hailhebod a laeras marc'h ar julod, hag ar mab dinatur hini e dad, evit mont d'an argad...  
Ar werin galonek a vo uhelaet; setu lezenn Nomenoe.

(D'AR FOETER-HENT) : Te ' vo nobl hiviziken, te ha da geneiled, ar foeterien-hent. Rak ar werin eo ar ouenn a gan, a gar, a gann hag a gemenno.

(*Eur pennad. Pedi a ra.*)

Aotrou Doue, dirazout emañ dister ha noaz,  
Evel da Vab war ar groaz.  
Hogen, al labour boulc'het a zo da veza kaset da benn,  
Ha n'oun va-unan nemet eur foeter-hent.  
Foeterien-hent a vo arme Breiz nevez.  
Hogen, n'o deus na mad na danvez.  
O danvez a zo karantez evit o bro ha Doue;  
Er bed all evito, e talvezo leve.  
Kinnig a ran d'it va foeterien-hent, Aotrou Doue;  
O c'hinnig a ran d'it korf hag ene.  
Kemer ar re a zo bet lazeta, en da baradoz;  
Ar re a chom, skuilh warno da vennoz.  
Skuilh ennoun sklerijenn, skuilh warno da nerz,  
Betek ma vo sevenet an diweza aberz.



(*Eur c'han dudius  
a ziskenn eus an neñv  
hag e weler o tarza en dro  
da NOMENOE tasmantou gwenn  
ha lugernus ar vrezelourien bet  
a ya e vent war vrasaat.  
lazet e kompezenn Ballon. NOMENOE*)

Me' zo, e Breiz Nevez, Foeter-Hent Doue...

Me' zo an Nomenoe, penn-da-benn.

(*Lien.*)

Echu e DOUARNENEZ

20 - Gouere - 1935

Peurvoulet  
war waskou an "Dépêche", e Brest  
F. GOINARD, rener  
ar 19 c'hovevrer 1941  
evit  
Skrid ha Skeudenn



